

KATEKIZ

MOULLET DRE URZ

AN OTRO PER-MARI-FREDERIK FALLIÈRES

ESKOP ZANT-BRIEK HA LANDREGER



EN TI R. PRUD'HOMME, MOULLER HA LEVRER

EN 'ZANT-BRIEK

Louis Callarec

LETTRE DE MM. LES ARCHIDIACRES

A

Sa Grandeur Mgr l'Evêque de St-Brieuc et Tréguier

Sur la Nouvelle Edition du Catéchisme Breton

MONSEIGNEUR,

Vous aviez bien voulu nous confier le soin de préparer une nouvelle édition du Catéchisme breton de votre Diocèse.

Nous avons l'honneur de la soumettre à votre haute approbation. et de rappeler en même temps pourquoi et dans quelle mesure elle diffère de la précédente.

I. — Le Catéchisme que Votre Grandeur trouva aux mains de ses jeunes diocésains bretons, n'était que la reproduction des *Demandes*, des *Réponses* et des *Prières* d'un Catéchisme antérieur, réédité en 1783 à Morlaix par ordre de Monseigneur Le Mintier, et augmenté d'un grand nombre de traits historiques et d'explications utiles au peuple chrétien (1).

(1) Catechis imprimet dre urz an Autrou Augustin-René-Louis Le Mintier, Escop a Dreguer. Edition nevez, augmentet dre un nombr' bras a histoario hac explicationo utl evit ar bobl christen. Voar an imprimet en Montroules, en ty Pierre Guyon, MDCCLXXXIII.



ANNONSIATION AR WERC'HEZ GLORIUZ VARI

Ar Werc'hez ha zantez Anna. — Mari oc'h arruout ebarz en Templ. — Mari o chom en Templ. — Dimizi ar Werc'hez.

C'était le Catéchisme plus que séculaire de Tréguier.

On ne saurait l'apprécier plus équitablement qu'en se souvenant non seulement des services immenses rendus par lui à l'enseignement de la religion, avant, pendant et depuis la tourmente révolutionnaire, mais encore de l'insuccès des différentes tentatives faites pour le remplacer avec avantage.

Cependant, si vénérable qu'il fût par son antiquité et ses autres mérites, il ne répondait plus, de l'aveu de tous, à son glorieux passé et aux exigences des temps actuels. Plus d'une négligence, préjudiciable à l'exactitude et à la clarté, s'était glissée dans le texte même de la dernière réimpression. D'autre part, la véritable renaissance dont les Lettres bretonnes restent redevables à Monseigneur David, ne permettait plus de conserver intégralement et sans modification le texte primitif, moitié français, moitié breton, transmis par le XVIII^e siècle. Enfin, quelques additions étaient absolument nécessaires pour mettre les catéchistes à même « d'instruire les « enfants de certains points de doctrine, qu'il est « impossible de passer sous silence après les « définitions solennelles du Pontife Romain et du « Concile du Vatican (1) ».

Voilà pourquoi, Monseigneur, le Catéchisme

(1) Lettre pastorale de Monseigneur, en date du 20 février 1891, sur la nouvelle édition du Catéchisme français.

breton avait besoin d'être revu, corrigé et augmenté.

II. — Dans quelle mesure l'a-t-il été ?

Nous avons dû commencer tout naturellement par confronter l'édition la plus récente avec l'édition précitée de 1783, comme on compare avec l'original la copie que l'on veut reviser et perfectionner.

Rien de plus aisé que cet examen comparatif et que la restitution de textes à laquelle il donnait lieu. Mais s'agissait-il des modifications à introduire dans l'ouvrage ainsi révisé ? Bien qu'il ne pût être question de toucher au fonds immuable qui est la doctrine, « la chose devenait très délicate, les moindres changements dans le mode d'instruction religieuse élémentaire causant toujours une certaine perturbation, surtout dans cette nombreuse classe de fidèles pour qui l'instruction est plus difficile à acquérir (1). »

Après le double Catéchisme breton publié en 1843 par Monseigneur Le Mée (2), nombre de

(1) Lettre pastorale de Mgr Le Mée, en date du 27 sept. 1842, sur la nouv. édition du Catéchisme français.

(2) Suivant l'exemple donné par Mgr Le Mée, nous avons mis à sa vraie place, c'est-à-dire en tête de la leçon intitulée « Sur la Communion », *War ar Gommunion*, la demande égarée ailleurs : *Petra eo kominian* ? — Nous avons aussi fait entrer dans le corps du Catéchisme le texte latin et la traduction bretonne du *Pater*, de l'*Ave*, du *Credo*, du *Confiteor*, et les *Commandements de Dieu et de l'Eglise*.

manuscrits laissés par votre vénéré prédécesseur ou reçus en réponse à votre appel, Monseigneur, nous ont été ici d'un grand secours. Leurs auteurs le reconnaîtront au simple énoncé des règles suivantes, que nous nous sommes efforcés d'observer au triple point de vue de l'orthographe, de la syntaxe et du vocabulaire :

1° Adopter l'orthographe dite de *Le Gonidec* (1), tout en conservant les particularités du dialecte de Tréguier, notamment la voyelle *o* comme désinence des noms au lieu de la diph-tongue *ou* (2) ; la syllable *an* avec le son nasal, au lieu de la voyelle *a*, comme finale des super-latifs (3) et de certains infinitifs (4) ; la termi-

(1) Il importe de rappeler, avec *Le Gonidec*, 1° que la consonne *S*, toujours dure, ne se prononce jamais comme *z* même entre deux voyelles : v. g. *graso* ; prononcez comme s'il y avait *grasso* ou *graso*. 2° que la consonne *G*, également dure excepté devant *n*, se fait toujours sentir fortement devant toutes les voyelles ; elle a constamment la valeur du *γ* des Grecs et du *g* allemand, c'est-à-dire qu'elle se prononce toujours *ghe*, jamais *j* : v. g. *bugel*, enfant ; prononcez comme s'il y avait *bughel* ou *buguel*. 3° que la consonne *H* ne se prononce pas : elle ne sert, comme dans les mots français, *homme*, *honneur*, etc., qu'à conserver l'étymologie. Ex. *hano*, nom ; *hent*, chemin ; *peheni*, lequel, etc. La véritable aspiration *C'H* a le même son que dans le mot allemand *nacht*. Ex. *ar c'hras*, la grâce ; *sec'hed*, soif, etc.

(2) V. g. *Otro* pour *Otrou*, Seigneur ; *ilizou* pour *ilizo*, églises.

(3) V. g. *nesan* pour *nesa*, prochain, *proximus*.

(4) V. g. *magan* pour *maga*, nourrir ; *bean* pour *bea*, contracté de *beza*, être.

naison et de plusieurs autres infinitifs (1) substituée à la terminaison *out* plus régulière, mais généralement inusitée.

2° N'apporter, sous aucun prétexte, aucune autre modification à la formule bretonne de l'*Oraison Dominicale*, de la *Salutation Angélique*, du *Symbole des Apôtres*, de la *Confession des péchés*, des *Commandements de Dieu et de l'Eglise*, et de ces prières traditionnelles du matin et du soir dont le remaniement, ne fût-il que partiel, empêcherait les fidèles d'avoir tous, en s'adressant à Dieu, le même langage tant recommandé par le grand Apôtre (2).

3° Dans le corps même du Catéchisme, remplacer par des tournures celtiques les tournures étrangères au breton, et autant que possible, par des mots également celtiques, connus et ayant cours, les expressions françaises nuisibles à l'intelligence du texte, excepté toutefois celles qui, appartenant à la langue théologique, ne disparaîtraient qu'au détriment de la précision et peut-être de l'orthodoxie.

Mais la partie vraiment neuve et originale de la présente édition, Monseigneur, ce qui la différencie et la caractérise par dessus tout, ce sont les additions, aussi nécessaires qu'opportunes, qui avaient déjà, par vos soins, enrichi et complété le catéchisme français dans votre diocèse.

(1) V. g. *miret*, pour *mirout*, garder.

(2) 1. Cor. 10. *Obsecro... ut idipsum dicatis omnes et non sint in vobis schismata.*

Dogme de l'Immaculée Conception et de l'Infaillibilité papale ; place de choix assignée à saint Joseph dans le culte catholique : signalement et condamnation de la secte antichrétienne ; devoir des Chrétiens envers la Société temporelle ; rétablissement de l'usage des parrains et des marraines pour la Confirmation, conformément au désir du Saint-Siège ; défense faite à l'homme de chercher à séparer ce que Dieu a uni par le mariage (1) ; aucune des Demandes, aucune des Réponses récemment entrées dans le Catéchisme diocésain pour ne plus en sortir, n'a été oubliée, ni laissée de côté. Puissent-elles avoir toutes été traduites en breton, comme elles sont exprimées en français, dans cette langue familière, élégante et sobre, qui convient si bien à l'enseignement élémentaire des vérités de la religion !

Enfin, par une heureuse innovation dont le mérite appartient à votre imprimeur, Monseigneur, une parure d'illustration embellit la nouvelle édition du Catéchisme breton. Six images hors texte et à sujets multiples la composent, projetant sur les pages opposées de l'opuscule le reflet des mystères, tour-à-tour joyeux, douloureux ou glorieux, qu'elles représentent au vif. Comme les pieux vitraux de nos modestes églises de campagnes, elles attireront et reposeront les regards édifiés des chers enfants de nos paroisses bretonnes.

Tel est le petit livre dont nous venons de faire

(1) Matth. XIX, 6, *Quod ergo Deus conjunxit, homo non separet.*

l'historique et la description. Il n'attend que votre approbation et votre bénédiction, Monseigneur, pour aller apprendre ou rappeler à nos jeunes Bretons ce qu'ils doivent croire, demander, observer et recevoir (1) dans ce monde afin d'arriver sûrement au paradis dans l'autre.

Daignez agréer, Monseigneur, les sentiments de profond respect avec lesquels nous avons l'honneur d'être,

de Votre Grandeur,

les très humbles et très obéissants serviteurs
et archidiacres.

A. DUBOURG,

Archid. de Saint-Brieuc.

M. LE PROVOST,

Archid. de Tréguier.

Saint-Brieuc, le 12 mars 1892.

(1) Allusion aux quatre principales divisions du Catéchisme breton.

*Loïc Le Gall
Jean Rec
Jean Rec*

ORDONNANCE ÉPISCOPALE

PORTANT

Approbation de la nouvelle Edition du Catéchisme breton

NOUS, EVÊQUE DE S^t-BRIEUC ET TRÉGUIER,

Vu le Rapport, en date du 12 mars, à Nous adressé par Nos Vicaires généraux, les Archidiacres de Saint-Brieuc et de Tréguier, sur l'opportunité et la nécessité d'une nouvelle édition du Catéchisme breton pour Notre Diocèse,

Considérant que l'édition qui Nous a été présentée, Nous paraît répondre aux vœux qui Nous ont été exprimés et à ce qu'exigent de Nous les temps actuels,

Avons ordonné et ordonnons ce qui suit :

ARTICLE 1^{er}.— Le Catéchisme réédité par les soins de Nos Archidiacres pour la partie bretonne de Notre Diocèse, y sera obligatoire, à l'exclusion de toute autre, à partir du 1^{er} septembre 1892.

ARTICLE 2.— M. René PRUD'HOMME, Notre imprimeur, est seul autorisé par Nous à l'imprimer.

ORDONNANCE ÉPISCOPALE

IX

Et sera la présente Ordonnance, avec le Rapport qui la précède et la motive, reproduite en tête de chacun des exemplaires du susdit Catéchisme.

Donné à Saint-Brieuc, en Notre palais épiscopal, sous Notre seing, le sceau de Nos armes et le contre-seing du Secrétaire général de Notre Evêché, le 19 mars 1892, en la fête du glorieux saint Joseph.



† PIERRE-MARIE,

Ev. de Saint-Brieuc et Tréguier.

Par Mandement de Monseigneur :

A. DE LA VILLERABEL,
Secrétaire général.

Iterum typis mandetur.

Brioci, die 19^a Martii 1908.

† JULIUS-LAURENTIUS,

Episc. Briocen. et Trecoren.

KANTIK

KENT AR C'HATEKIZ

En hano an Tad, hon C'hrouer,
Ha Jezuz he Vab, hon Zalver,
Hag ar Speret-Santel ive,
Tri ferson er memes Doue.

Reit d'in, ma Jezuz binniget,
Eur speret dous, humbl ha parfet,
Evid galloud diski ervad
Ar C'hatekiz, herve ma n-oad.

Reit d'in ar c'hras ma komprenin
Ar pezh a vo diskleriet d'in ;
Ha, goude hen bean disket,
Ar c'hras d'hen pratikan bepret.

GOUDE AR C'HATEKIZ

M'ho trugareka, ma Jezuz,
Dimeuz ho kelen presiuz,
Ha dreist pep tra deuz ar gentel
A zo bet disket d'in bugel.

Ma Zalver Jezuz, pardonet
Mar d-on hirie skanv a speret ;
Na zellet ked ouz-in, allaz !
Ne-d-on nemed eur bugel c'hoaz.

Eur c'hrouadur a vo kollet,
Mar goar ar vad, ha n'hen gra ket.
Dre ma tisker d'in ho lezen,
Ma gret ive furoc'h kristen.

KATEKIZ

ESKOPTI ZANT-BRIEK HA LANDREGER

Declaratio sermonum tuorum illuminat, et intellectum dat parvulis Ps. 118, v. 132.

Pa zisklerier ho komzo, o ma Doue, e sklerijenner an ineo, hag e tigorere spered ar re vian.

I. KENTEL

War ar C'hatekiz

* Goulen. *Ha c'houi zo kristen ?*

Respond. Ia, a drugare Doue.

*G. *Piou eo an hini a dle bean hanvet kristen ?*

R. An hini a zo badeet, a gred, hag a heuill al lezen gristen.

*G. *Petra eo al lezen gristen ?*

R. Lezen Jezuz-Krist.

*G. *Hag hen zo red gout ha heuill al lezen gristen ?*

R. Ia, mar fell d'imp bean zalvet.

*G. *Pelec'h e tisker al lezen gristen ?*

R. Er C'hatekiz.

*G. *Petra eo ar C'hatekiz !*

R. Eur gelennadurez skler hag a zisk d'imp pevar zra.

*G. *Leret d'in ar pevar zra-ze ?*

R. Kridi, goulen, ober ha resev.

*G. *Petra dleomp-ni da gredi ?*

R. An oll artiklo deuz ar fe, ha dreist pep tre ar re zo ar *Gredo*.

*G. *Petra dleomp-ni da c'houlen ?*

R. Ar pezh a zo er *Bater* hag er pedenno all kavet mad gand an Iliz.

*G. *Petra dleomp-ni da ober ?*

R. Ar pezh a zo gourc'hemenet gand Doue ha gand an Iliz.

*G. *Petra dleomp-ni da resev ?*

R. Ar *Zakramancho*.

*G. *Piou a dle ober Katekiz en tu-ont d'an dud an Iliz ?*

R. An tado, ar mammo, ar mestro, ar mestrezet, hag ar re a ra skol.

*G. *Piou a dle dont d'ar C'hatekiz ?*

R. Ar vugale hag an dud vraz peurvuian.

G. *Evit petra an dud vraz ?*

R. Evid harz da ankouaat, ha diski ar pezh ne ouzont ket.

G. *Petra zo kiriek d'an darn vuian deuz an dizurzo a ren er gristenez ?*

R. N'anaveer ket awalc'h ar relijion gristen.

KELENNADUREZ

1^o Pidi ar vugale da vean aketuz da zont d'ar c'hatekiz, hag ho c'herent d'ho digas.

2^o Diski pegen mad ha talvouduz eo ar c'hatekiz.

3^o Jezuz-Krist hag he ebestel ho deuz gret ar c'hatekiz.

4^o Diski d'ar vugale penoz e tleont bean, kent ha goude hag epad ar c'hatekiz.

II. KENTEL

War zin ar Groaz.

*G. *Gret zin ar Groaz en brezonek.*

R. † En hano an Tad, hag ar Mab, hag ar Speret-Santel. Evel-se beet gret.

*G. *Gret zin ar Groaz en latin.*

R. † In nomine Patris, et Filii, et Spiritus Sancti. Amen.

*G. *Petra eo zin ar Groaz ?*

R. Zin ar c'hristen.

*G. *Perak zin ar c'hristen ?*

R. Abalamour dre zin ar Groaz ec'h ana-veer eur c'hristen.

*G. *Ha ni dle ober alies zin ar Groaz ?*

R. Ia, gant fe ha devosion.

G. *Pegouls e tleer ober zin ar Groaz ?*

R. Pa zifuner ; pac'h eer da gousket ; pa gemerer dour binniget ; er penn kentan deuz al labour hag ar beden ; ha pa arru eur spont pe eur risk bennag.

G. *Perag ober ken alies zin ar Groaz ?*

R. Evit diskoue ec'h omp kristenien, trec'hi hon enebourien ha zantelaat hon obero.

KELENNADUREZ

1^o Ober aliez zin ar Groaz ; dreist pep tra, pa ver er risk da bec'hi.

2^o Dougen bepret warnomp eur Groaz bennag.

3^o Zin ar Groaz a zo evidomp evel eur skeuden deuz tri mister braz : mister'an Drinded, mister an Inkarnasion ha mister hon Redamslon.

KENTAN LODEN

WAR AR PEZ A DLEOMP DA GREDI

I. KENTEL

War berfeksiono Doue.

1. Art. deuz ar GREDO : *Me gred en Doue, etc.*

G. Petra dleomp-ni da gredi ?

R. An oll artiklo deuz ar fe, ha dreist pep tra ar re a zo er *Gredo*.

G. Petra eo ar Gredo ?

R. Eur feson da ansav ha da zisklerian hon fe, hag a zeu d'imp digand an Ebestel.

**G. Ped artikl zo er Gredo ?*

R. Daouzek, hag a dle an oll da c'hout.

G. Leret ar Gredo en latin.

R. 1. Credo in Deum, Patrem omnipotentem, creatorem cœli et terræ ; — 2. et in Jesum-Christum, Filium ejus unicum, Dominum nostrum, — 3. qui conceptus est de Spiritu Sancto, natus ex Maria Virgine, — 4. passus sub Pontio-Pilato, crucifixus, mortuus et sepultus ; — 5. descendit ad inferos, tertiâ die resurrexit a mortuis, — 6. ascendit ad cœlos, sedet ad dexteram Dei Patris omnipotentis : — 7. indè venturus est judicare vivos et mortuos.

WAR AR GREDO

5

8. Credo in Spiritum, Sanctum, — 9. sanctam Ecclesiam catholicam, Sanctorum communionem, — 10. remissionem peccatorum, — 11. carnis resurrectionem, — 12. vitam æternam. Amen.

**G. Leret ar Gredo en brezonek ?*

R. 1. Me gred en Doue, an Tad oll-c'halloudek, krouer an env hag an douar ; — 2. hag en Jezuz-Krist, he Vab unik, hon Otro ; — 3. a zo bet konsevet dre c'hras ar Speret-Santel, ganet gand ar Werc'hez Vari ; — 4. en deuz anduret dindan Pons-Pilat, a zo bet krusifiet, maro hag interret ; — 5. a zo bet diskennet d'an ifernio, a zo resusitet, an drede de, a varo da veo ; — 6. a zo pignet en envo, hag azeet en tu deo da Zoue an Tad oll-c'halloudek ; — 7. ac'hane e teui da varn a re veo hag ar re varo.

8. Me gred er Speret-Santel, — 9. an Iliz santel, katolik, kommunion ar Zent, — 10. remision ar pec'hejo, — 11. rezurreksion ar c'horfo, — 12. ar vue eternal. Evelse beet gret.

**G. C'houi lavar e kredet en Doue : ped Doue zo ?*

R. Unan hepken.

**G. Petra eo Doue ?*

R. Eur speret pur hag oll-c'halloudek, krouer an env hag an douar, leun a bep sort perfeksiono.

**G. Doue hag hen zo eternal ?*

R. Ia, rak bet eo a oll-viskoaz ha bean a vo da oll-viken.

*G. *Pelec'h eman Doue ?*

R. Dre oll.

*G. *Eman ive eta en Ifern, er Purgator hag er Baradoz ?*

R. Ia, gwir mad.

G. *Petra ra Doue en Ifern ?*

R. Kastian da viken ar re daonet.

G. *Petra ra Doue er Purgator ?*

R. Kastian evid eun amzer ar re zo maro en stad a c'hras hag a zo dleourien de Zoue evid ho fec'hejo tremenet.

G. *Petra ra Doue er Baradoz ?*

R. Ober pep mad da virviken d'ar re evuruz.

*G. *Hag hen eman Doue aman ive ?*

R. Ia, en gwirione.

*G. *Perak na welomp-ni ked anehan ?*

R. Abalamour m'ec'h eo eur speret pur, ha n'en deuz ked a gorf evit bean gwelet

*G. *Hag hen a wel hag a gleo ac'hanomp-ni ?*

R. Ia, klevet a ra oll, gwelet a ra oll, beteg ar zonjezono ar muian kuzet en hon c'halon.

KELENNADUREZ

1^o Ar zonz ec'h omp dirag Doue a zo mad meurbed eneb d'ar pec'het.

2^o Doue a zo dre oll; mes, dreist pep tra, ebarz an ilizo.

II. KENTEL

Heuil an art. 1. *An tad oll-c'halloudek, etc.*

MISTER AN DRINDET

G. *Perag e leret-hu : Doue an Tad ?*

R. Abalamour ar c'hentan person deuz an Drindet a zo hanvet *Tad*.

G. *Perag eo-han hanvet Tad ?*

R. Abalamour m'en deuz eur Mab par d'ehan e pep tra.

G. *Perak leret-hu an Tad oll-c'halloudek ?*

R. Abalamour he c'halloud zo dreist muzul.

*G. *Pet person zo en Doue ?*

R. Tri : an Tad, ar Mab, hag ar Speret-Santel.

*G. *An Tad hag hen zo Doue ?*

R. Ia, an Tad zo Doue.

*G. *Ar Mab hag hen zo Doue ?*

R. Ia, ar Mab zo Doue.

*G. *Ar Speret-Santel hag hen zo Doue ?*

R. Ia, ar Speret-Santel zo Doue.

*G. *Tri Doue int-hi ?*

R. Salokras, ne d-int ho zri nemed eun Doue hepken.

G. *Perag an tri ferson divin-ze na reont ho zri nemend eun Doue hepken ?*

R. Abalamour n'ho deuz ho zri nemed ar memes natur, pe ar memes divinite.

*G. *Pehini deuz ar tri ferson-ze eo ar c'hosan hag ar muian galloudek ?*

R. Kemend ha kement int ho zri en pep tra.

*G. *Penoz e c'hell c'hoarveout ec'h int unan ha tri war eun dro ?*

R. Eur mister eo a dleomp da gredi ha da adori, hep gout penoz e c'hell c'hoarveout.

*G. *Leret d'in breman petra eo an Drindet ?*

R. Eun Doue e tri Ferson, distinkt an eil deuz egile : an Tad, ar Mab hag ar Speret-Santel.

*G. *Gret eun akt a fe war vister an Drindet.*

R. Me a gred ferm tri Ferson en Doue,
Ho zri distinkt an eil deuz egile :
An Tab, ar Mab hag ar Speret-Santel ;
Er greden-ze e teziran mervel.

KELENNADUREZ

1^o Mister an Drindet hag ar misterio all a zo huelloc'h evid hon skiant ; mes n'int ked eneb ar skiant.

2^o Hon ine a zo evel eur skeuden deuz mister an Drindet.

3^o Ober alies akto a fe war ar mister braz-man, akto a adorasion hag a humilite.

III. KENTEL

Heuil an art. 1. *Krouer an env hag an douar.*

*G. *Laret a ret Doue Krouer an env hag*

an douar, *ha n'en deus-han krouet nemed an env hag an douar ?*

R. Krouet en deuz ive an Ele, an dud, kement tra zo.

*G. *Piou eta en deuz ho krouet ?*

R. An Otro Doue.

*G. *Petra oc'h euz-hu bet digant ho Krouer ?*

R. Eur c'horf mortel hag eun ine immortal.

G. *Petra eo eur c'horf mortel hag eun ine immortal ?*

R. Da laret eo : ar c'horf a varvo ; mes an ine n'hell ket mervel, hag ha bado da viken.

*G. *Evit petra oc'h-hu krouet gant Doue ?*

R. Evid hen anaveout, hen karet hag hen zerviji er bed-man, ha dre-ze bean evuruz gant-han er bed-all.

*G. *Penoz e veomp-ni evurus gant Doue er bed-all ?*

R. O welet hag o karet Doue, hag o tanva pegen mad eo bean gant-ha da viken.

G. *Laret a ret en deuz Doue krouet an Ele ; petra eo an Ele ?*

R. Sperejo int krouet gant Doue evid he c'hloar hag he zervij.

G. *Pet rum Ele zo ?*

R. Daou rum : droug Ele hag Ele mad.

G. *Petra ra an droug Ele, pe an droug sperejo ?*

R. Kastian ar re daonet en Ifern, ha dougen d'ar pec'het ar re veo war douar.

G. *Petra ra an Ele mad ?*

R. Meuli Doue en env hag evesaat ac'hanomp er bed-man.

G. *Pehini eo an El a zo, dreist ar re all, karget a bep hini ac'hanomp ?*

R. Hon El mad.

G. *Petra displij ar muian d'an El mad ?*

R. Ar pec'het.

KELENNADUREZ

1° Trugarekaat Doue d'hon bean krouet henvel out-han hag evit bean evuruz gant-han.

2° Eno i henvedigez Doue en-omp hon unan hag er re-all.

3° Enori an El mad a zo, bepred ganimp, ha pidi anehan alies.

IV. KENTEL

2. Art. *Hag en Jezuz-Krist, he Vab unik, hon Otro.*

MISTER AN INKARNASION

G. *Petra lac ar c'homzo-ze- : Hag en Jezuz-Krist, he Vab unik ?*

R. Laret a reont e kredomp ive en Jezuz-Krist.

G. *Perag e leret-hu he Vab unik ?*

R. Abalamour n'en deuz nemed Jezuz-Krist a ve dre natur Mab Doue.

G. *Perag e hanvet-hu Jezuz-Krist hon Otro ?*

R. Abalamour en deuz hon c'hrouet hag hon prenet.

*G. *Petra eta eo Jezuz-Krist ?*

R. An eil ferson deuz an Drindet, Mab Doue inkarnet.

*G. *Petra eo en em inkarni ?*

R. Da laret eo : en em ober den.

G. *Petra eta eo mister an Inkarnasion ?*

R. Mister an eil ferson an Drindet pehini a zo en em c'hret den.

*G. *Leret d'in c'hoaz pet person zo en Drindet ?*

R. Tri : an Tad, ar Mab hag ar Speret-Santel.

*G. *Pehini deuz an tri ferson divin-ze a zo en em c'hret den ?*

R. An eil ferson, Doue ar Mab.

*G. *An tad hag hen zo en em c'hret den ?*

R. Salokras.

*G. *Ar Speret-Santel hag hen zo en em c'hret den ?*

R. Salokras ; Mab Doue hepken, an eil ferson deuz an Drindet, a zo en em c'hret den.

*G. *Petra en deus-han gret, evid en em ober den ?*

R. Kemer eur c'horf hag eun ine evel hon euz-ni.

*G. *Pelec'h en deus-han kemeret ar c'horf hag an ine-ze ?*

R. En korf pur ar Werc'hez Vari, dre c'hal-loud ar Speret-Santel.

*G. *Pe hano en deuz Mab Doue a zo en em c'hret den ?*

R. Jezuz-Krist, hon Zalver, gwir Doue ha gwir den ive.

*G. *Pelec'h eman breman Jezuz-Krist ?*

R. Evel Doue, eman dre oll ; evel Doue ha den, eman er Barados hag en zakramant an Oter.

*G. *Perag eo hanvet Zalver ?*

R. Abalamour m'en deuz zaveteet ac'hanomp dre he varo war ar groaz.

*G. *Kalz a anaoudegez vad a dleomp eta da Jezuz-Krist ?*

R. Allaz ! panevet-han e oamp oll kollet.

*G. *Piou en doa kollet ac'hanomp-ni ?*

R. Hon zad kentan Adam en baradoz an douar.

G. *Petra reaz Adam ?*

R. Dibri eun tamm aval.

*G. *Perag oe pec'het d'ehan dibri eun tamm aval ?*

R. Abalamour ma oe difennet out-han gand Doue.

*G. *Gret eun akt a fe war vister an Inkarnasion.*

R. An eil Ferson deuz an Drindet Santel, Ar Verb divin, Mab an Tad eternal, A gredan ferm a zo en em c'hret den ; Ma esperanz a zo enhan hepken.

KELENNADUREZ

1^o Trugarekaat Jezuz-Krist da vean en em c'hret den, hag ober alies akto a fe war ar mister-man.

2^o Kaout eur gasoni vraz ouz ar pec'het marvel, zoursen a gement a boanio evid Adam hag he vugale.

3^o Rei da anaveout d'an oll pegemend a zroug en deuz gret d'imp ar pec'het orijinel.

V. KENTEL

5. Art. *A zo bet konsevet dre c'hvas ar Speret-Santel ; ganet gand ar Werc'hez Vari.*

KROUIDIGEZH HA GANEDIGEZH HON ZALVER

G. *Pe da de eo bet konsevet hon Zalver ?*

R. Ar bemped de war-n-ugent a viz Meurs, de ouel an Annonasion.

G. *Pelec'h oa ar Werc'hez, pa gonsevaz hon Zalver ?*

R. Er vro hanvet Galile, er ger a Nazareth.

G. *Sant Jozeph hag hen zo gwir dad d'hon Zalver ?*

R. Salokras, ne-d-eo nemed he dad mager.

G. *Penoz e deuz gallet ar Werc'hez bean mamm ha gwerc'hez asambles ?*

R. Kement-se a zo eur burzud a c'halloud Doue.

G. *Pegouls eo ganet hon Zalver ?*

R. E noz an Nedelek, da hanter-noz.

G. *Pelec'h eo han ganet ?*



R. Er ger a Vethleem, en^oeur c'hraouik dister.

G. Pe da de oe sirkonsizet, hag e skuillaz da gentan he wad evidomp ?

R. En de kentan ar bla, eiz de goude ma oe ganet.

G. Pe hano oe roet d'ehan ?

R. An hano a Jezuz, da laret eo Zalver.

G. Pe da de oe han adoret gand ar rouane ?

R. De ouel ar Rouane, ar c'hoec'hvet de a viz Genver.

G. Pe da de oe han douget d'an templ ?

R. An eil de a viz C'hoevrer, de ouel ar Chandelour.

G. Pelec'h e tremenaz hon Zalver an darn vuian deuz e vue ?

R. Er ger a Nazareth.

G. Petra eure hon Zalver eno er c'heit-segant zant Jozeph hag ar Werc'hez ?

R. Zenti ouz he gerent, ha prezek dre skouer vad, o c'hortoz prezek dre gomzo.

G. Pe n-oad en doa hon Salver p'en em lekeaz da brezek ha da ober miraclo ?

R. War dro an oad a dregont vla.

G. Petra en deus-han disket d'imp dre he gomzo ?

R. An hent da vont d'ar baradoz.

G. Ha dre he viraklo ?

R. E oa gwir Vab Doue, hag e oa gwir he lezen.

KELENNADUREZ

- 1^o Laret gand doujanz Doue an hano zantel a Jezuz
 2^o Zenti evel ar mabik Jezuz.
 3^o Ar Famill zantel, Jezuz, Mari ha Jozeph, kaëran
 skouër d'an tiegezo kristen !
 4^o Enori ha heuil komzo Doue.

VI. KENTEL

4. Art. *En deuz anduret dindan Pons-Pilat, a zo bet krusifiet, maro hag interret.*

G. *Petra eo mister hon Redamsion ?*

R. Jezuz-Krist maro war ar Groaz evid hon tennan deuz chadenno ar pec'hed ha deuz poanio an Ifern, ha meritout evidomp ar vue evuruz da viken.

*G. *Hon Zalver Jesus-Krist hag hen en deuz gouzanvet kalz a boanio evidomp ?*

R. Ia, ar re vrasan, hag en he ine, hag en he gorf.

G. *Pesort poan a lere e c'houzanve en he ine ?*

R. Laret a re e oa trist he ine, beteg ar maro.

G. *Pet poan, dreist ar re all, e c'houzanvaz en he gorf ?*

R. Pemp : d'ar c'henta, e c'houezaz an dour hag ar gwad ; d'an eil, oe skourjeet ; d'an drede e oe kurunet a spern ; d'ar bevarred, e tougaz he groaz ; d'ar bemped, e oe krusifiet.

*G. *Evit petra en deuz hon Zalver gouzan-*

vet kemend a boanio hag eur maro ken euzuz ?

R. Evit diskoue d'imp he garante ha grevusdet ar pec'hed.

G. *Ha n'en dije ket galled eun den pe eun El peurbacan da justis Doue evid hon fe-c'hejo ?*

R. Salokras, abalamour d'an offans a ra ar pec'hed da Zoue hag a zo dreist muzul.

G. *Penoz en deuz gallet hon Zalver mervel, hag hen Doue ?*

R. Ne-d-eo maro nemed evel den ; hag evel Doue en deuz roet eur briz dreist muzul d'he boanio.

*G. *Evid piou eo maro hon Zalver ?*

R. Evid an oll, hag evit pep hini ac'hanomp.

*G. *Pe da de e varvaz hon Zalver ?*

R. De Gwener ar Groaz.

G. *Piou zo bet kiriek d'he varo ?*

R. Ar Judevien hag ar bec'herien.

G. *Pegeit e oe han er groaz kent mervel ?*

R. War dro teir heur, ha neuze e tispartiaz he ine deuz he gorf.

G. *Nag e zivinite ?*

R. Ne-d-eo biskoaz 'n em dispartiet na deuz he ine na deuz he gorf.

*G. *Gret eun akt a fe war vister hon Redamsion ?*

R. Me a gred fermamant, ma Jezuz dous ha mad,

Penoz oc'h euz skuillet evidon hoc'h
oll gwad,
Ha n'en deuz gras ebed, na merit, na
pardon.
Nemed dre ho maro ha dre ho pasion.

KELENNADUREZ

1^o Trugarekaat Jezuz-Krist da vean hon prenet, ha
rei d'eban karante evit karante.

2^o Kazout ar pec'het a zo bet kiriek d'he boanio ha
d'he varo.

3^o Unani hon foanio gant re hon Zalver.

VII. KENTEL

5. Art. *A zo bet diskennet d'an ifernio, a zo resusitet,
an drede de, a varo da veo.*

6. Art. *A zo pignet en envo, hag azeet en tu deo
da Zoue an Tad oll-c'halloudek.*

DISKEN HON ZALVER EL LIMBO
HAG HE REZURREKSION

G. *Pelec'h e tiskennaz hon Zalver goude
he varo ?*

R. Disken a eure d'an Ifernio.

G. *Petra eo an Ifernio.*

R. Allec'h e oe dalc'het ineo an Tado Zantel.

G. *Piou e oa an Tado Zantel ?*

R. Ar re a oa maro en stad a c'hras kent
donidigez hon Zalver.

G. *Evid petra ec'h eaz hon Zalver da gaout
an Tado Zantel ?*

R. Evit digas d'he ar c'helo en doa ho fre-
net, hag e vijent hep dale tennet ac'hane.

G. *Pe da de e resusitaz hon Zalver ?*

R. De zul Fask, deuz ar mintin, an drede
de goude he varo.

G. *Pegeit e chomas-han war an douar,
goude he rezurreksion ?*

R. Daou-ugend de, evit kelen he ebestel.

G. *Pe da de e pignas-han en env ?*

R. Ar Iaou-Bask, da ouel an Asansion.

G. *Penoz e pignas-han en env ?*

R. Pignal a eure korf hag ine, dre he
c'halloud he unan.

G. *Penoz eman hon Zalver breman en
env ?*

R. Azeet eo en tu deo da Zoue an Tad oll-
c'halloudek.

G. *Petra eo ar c'homzo-ze : Azeet en tu
deo da Zoue an Tad oll-c'halloudek ?*

R. Da laret eo : Jezuz-Krist, evel Doue, a
zo ken galloudeg hag he Dad ; hag, evel
den, en deuz mui a c'hloar hag a c'halloud
evid an oll grouadurien.

G. *Evit petra eo pignet hon Zalver en
envo ?*

R. Evit digerri d'imp dor an env, bean
hon difenner, ha digas d'imp ar Speret-San-
tel.

KELENNADUREZ

1^o Kemer laouenedigez gant Jezuz-Krist, en deuz
trec'het war ar maro.

2^o Huanadi alies etrezeg ar Baradoz.

VIII. KENTEL

7. Art. *Ac'hane e teui da varn ar re veo hag ar re varo.*
 8. Art. *Me gred er Speret-Santel.*

AR VARN JENERAL HAG AR SPERET-SANTEL

G. *Hag hen a vo gwelet hon Zalver o tistrei c'hoaz war an douar ?*

R. *Ia, de ar Varn jeneral.*

G. *Pegouls a vo de ar Varn ?*

R. *Ne ouzer nag an heur nag an amzer.*

G. *Petra rai hon Zalver d'imp-ni de ar Varn ?*

R. *Ober d'imp renti kont deuz hon droug ha deuz hon mad.*

G. *Pesort barn a roio-han d'an dud zantel ?*

R. *« Deut, tud binniget, da gemer lod er « rouantelez preparet evidoc'h aboe ar « penn kentan deuz ar bed. »*

G. *Pesort barn a roio-han d'an dud fall ?*

R. *« It pell diouzin, tud miliget, d'an « ifern, gand an diaoulo, ho konsortet. »*

G. *Laret a ret e kredet er Speret-Santel ; petra eo ar Speret-Santel ?*

R. *An drede ferson deuz an Drindet, gwir Doue evel an Tad hag ar Mab.*

G. *Pe da de e tiskennaz ar Speret-Santel war an ebestel ?*

R. *De zul ar Pentekost.*

G. *En pe form e tiskennas-han ?*

R. *En form teodo tan.*

KELENNADUREZ

1^o *Zonjal alies er Varn jeneral.*

2^o *Pidi alies ar Speret-Santel, ha diwall d'hen tristaat dre ar pec'het.*

IX. KENTEL

9. Art. *Me gred an Iliz santel, katolik ; kommunion ar Zent.*

AN ILIZ HA KOMMUNION AR ZENT

G. *Petra eo an Iliz ?*

R. *Ar bobl kristen, unanet gand ar memes fe hag ar memes zakramancho, ha gouarnet gand ar Pab hag an Eskibien.*

G. *Piou eo ar Penn deuz an Iliz ?*

R. *Jezuz-Krist eo ar Penn pe ar chef kentan ha ne weler ket, hag ar chef a weler eo hon Tad Zantel ar Pab, Vikel Jezuz-Krist war an douar.*

G. *Ped Iliz zo ?*

R. *N'en deuz nemed eur wir Iliz, ha n'heller bean zalvet nemed en-hi hepken.*

G. *Perak n'en deuz nemed eur wir Iliz ?*

R. *Abalamour n'en deuz nemed eur wir religion hag eur gwir Doue.*

*G. *Pehini eo ar wir Iliz n'heller bean zalvet nemed en-hi hepken ?*

R. An Iliz santel, katolik, abostolik, ha romen.

G. *Perag eo hanvet an Iliz santel ?*

R. Abalamour ma eo zantel he Fenn, Jezuz-Krist ; zantel he lezen, zantel he zakramancho, ha n'en deuz gwir zantelez nemed en-hi.

G. *Perag eo hanvet an Iliz katolik ?*

R. Abalamour eman dre oll ebarz ar bed, hag e pado bete fin ar bed.

G. *Perag eo hanvet an Iliz abostolik ?*

R. Abalamour ma eo bet zavet gand an ebestel, dre ho gwad hag ho c'heleennadurez.

G. *Piou en deuz miret bete vremen en Iliz keleennadurez an ebestel ?*

R. An Eskibien, gwir keritourien d'an ebestel.

G. *Perag eo hanvet an Iliz romen ?*

R. Abalamour m'eo gouarnet gand ar Pab a Rom.

G. *Pere eo deverio ar gristenien e kenver an Iliz ?*

R. Ar gristenien a dle kredi ar pezh a zo disket d'he gand an Iliz, hag ober ar pezh a zo gourc'hemenet gant-hi.

G. *An Iliz hag hi n'hell ket en em dromplan en he c'heleennadurez ?*

R. Nan ; rak renet eo gand ar Spered-Santel.

G. *Hag hon Tad Zantel ar Pab, hag hen n'hell ked en em dromplan ?*

R. Nan, pa gomz evel heritour zant Per, o c'hourc'hemenn d'an oll gristenien, abeurz Jezuz-Krist, petra 'zo red da gridi pe da ober.

G. *Petra eo kommunion ar Zent ?*

R. Mado spirituel hag e c'hell kaout lod en-he ar gristenien a zo mempro deuz ar wir Iliz.

G. *Petra eo ar mado spirituel-ze a zo etre mempro ar wir Iliz ?*

R. Merito Jezuz-Krist, ha merito ar Zent a zo en env ha war an douar.

KELENNADUREZ

- 1° Trugarekaat Doue abalamour oc'h ganet er wir Iliz.
- 2° Rei da anaveout petra eo an eskumunugen.
- 3° Pidi evid ar re zo dispartiet deuz ar wir Iliz, hag evid ar Gatoliket a vue fall.

X. KENTEL

10. Art. *Remision ar pec'hejo*. — 11. Art. *Rezurreksion ar c'horfo*, — 12. Art. *Ar vue eternal*.

G. *Petra eo remision ar pec'hejo ?*

R. Ar galloud e deuz an Iliz digant Jezuz-Krist da bardoni ar pec'hejo.

G. *Hag hen zo eur pec'het bennag ha n'helfe ket bean pardonnet ?*

R. Salokras, n'en deuz hini.

G. *Petra eo rezurreksion ar c'horfo ?*

R. Rezurreksion an oll gorfo maro, pere,

e fin ar bed, en em unano a neve flamm gand an ineo, evit bean evuruz en env pe daonet en ifern.

G. *Petra eo* ar vue eternal ?

R. Eur vue all hag a bado da virviken.

G. *Hag hen eo red, evit bean zalvet, kredi an oll artiklo deuz ar Gredo ?*

R. Ia, ha nac'h unan hepken a zo awalc'h evid koll ar fe ha bean daonet.

G. *Ha ni zo red d'imp kredi eun dra ben-nag ouspen ar pezh a zo er Gredo ?*

R. Ia, kemend a bropoz d'imp da gredi hon Mamm zantel an Iliz.

G. *Gret eun akt a fe war an oll artiklo deuz ar fe.*

R. Me a gred ferm, ô ma Doue,
An oll artiklo deuz ar fe ;
Rag c'houi oc'h euz he revelet,
Hag a zo gwirion pa gomzet ;
Hag an Iliz a bropoz d'in
An artiklo-ze da gredi.

KELENNADUREZ

- 1° Konsoli ar bec'herien tentet da gouean en dizesper.
- 2° Lakaat hon c'horfo dre ar binijen da hellout resusitan leun a c'hloar.
- 3° Laret alies ar *Gredo* gand devoision.



HON ZALVER STAGET EUZ AR GROAZ

Korf Jezuz roet d'he Vamm,
Jezuz laket en en ve.
Hon Zalver a zisken d'an ifernio.

EIL LODEN

WAR AR PEZ A DLEOMP DA C'HOULEN

I. KENTEL

Ar beden a galon.

G. *Petra dleomp-ni da c'houlén ?*

R. Ar pez a zo er *Bater*, hag er pedenno all kavet mad gant an *Iliz*.

G. *Petra eo pidi ?*

R. Pidi a zo zevel hon speret hag hon c'halon war zu *Doue*, evid hen adori ha goulén digant-han he c'hraso.

G. *Hag hen eo red pidi ?*

R. Ia, ar beden a zo unan deuz hon bras an deverio.

G. *Pet sort peden zo ?*

R. Daou sort : ar beden a galon hag ar beden a c'heno.

G. *Petra eo ar beden a galon ?*

R. An hini a reomp da *Zoue* a speret hag a galon hepken.

G. *War betra eo ar gwellan ober ar beden a galon ?*

R. War varo ha pasion hon *Zalver*.

G. *Leret d'in an tu da ziski ober ervad ar beden a galon ?*

WAR AR BEDEN

27

R. En em gustumi d'he ober muian ma heller.

G. *Hag hen e c'hell an oll ober ar beden a galon ?*

R. Ia ; evid he ober, na renker kaout nemed gras *Doue*, eur speret hag eur galon.

G. *Pesort mad a zeu d'imp deuz ar beden a galon ?*

R. Ar beden-ze eo a blij ar muian da *Zoue*, hag a zoug ar muian a freuz evidomp.

G. *Perag eta a ra ken nebeut a dud ar beden a galon ?*

R. Abalamour nebeud a dud a anav e-zommo ho ine.

KELENNADUREZ

1° Diski an dever hag an ners deuz ar beden.

2° Diski an tu da ober ar beden a galon.

3° Alian an oll d'he ober, en eur heuill skouer Jezuz-Krist hag ar Zent.

II. KENTEL

War ar beden a c'heno

DISKLERIADUR AR BATER

G. *Petra eo ar beden a c'heno ?*

R. An hini a reomp da *Zoue* a c'heno hag a galon.

G. *Ar beden a reer da Zoue a c'heno hepken hag hi a blij d'ehan ?*

R. Salokras, pell ac'hane ; displijout a ra d'ehan.

G. *Pehini eo ar gaëran deuz an oll bedenno a c'heno ?*

R. Ar Bater.

G. *Piou en deuz gret ar Bater ?*

R. Hon Zalver Jezuz-Krist.

G. *Pet goulen zo er Bater ?*

R. Seiz, hag a dle an oll da c'hout.

G. *Leret ar Bater en latin ?*

R. 1. Pater noster, qui es in cœlis, sanctificetur nomen tuum ;

2. Adveniat regnum tuum ;

3. Fiat voluntas tua, sicut in cœlo et in terrâ ;

4. Panem nostrum quotidianum da nobis hodiè ;

5. Et dimitte nobis debita nostra, sicut et nos dimittimus debitoribus nostris ;

6. Et ne nos inducas in tentationem ;

7. Sed libera nos a malo. Amen.

G. *Leret ar Bater en brezonek.*

R. 1. Hon Tad pehini zo en env, ho hano beet santifiet ;

2. Ho rouantelez deuet d'imp ;

3. Ho polonte beet gret war an douar evel en env ;

4. Reit d'imp hon bara pempdiek ;

5. Pardonet d'imp hon offanso, evel ma pardonomp d'ar re ho deuz hon offanset ;

6. Na bermettet ked e kouezfemp en detasion ;

7. Mes hon delivret a bep drouk. Evelse beet gret.

G. *Ouz piou e komzomp-ni, pa leromp ar Bater ?*

R. Ouz Doue.

G. *Perag e hanvet-hu Doue hon Tad ?*

R. Abalamour m'en deuz hon c'hrouet hag hon c'hemeret evid e vugale.

G. *Evit petra a leret-hu « Hon Tad », e-lec'h laret « ma Zad » ?*

R. Evit diskoue penoz an oll gristenien a zo breudeur.

G. *Perag e leret-hu « Hon Tad pehini zo en env », pa eo gwir eman Doue dre oll ?*

R. Abalamour an env eo an trôn deuz he c'hloar.

G. *Petra c'houlennomp-ni dre ar c'hentan goulen : « Ho hano beet santifiet » ?*

R. Goulen a reomp ma vo Doue karet, enoret ha zervijet gand ar bed oll.

G. *Petra c'houlennomp-ni dre an eil goulen : « Ho rouantelez deuet d'imp » ?*

R. Goulen a reomp digant Doue e c'hras er bed-man, hag he c'hloar er bed-all.

G. *Petra c'houlennomp-ni dre an drede goulen : « Ho polonte beet gret war an douar evel en env » ?*

R. Goulen a reomp digand Doue ar c'hras da ober he volonte er bed-man, evel ma eo gret en env.

G. *Petra c'houlennomp-ni dre ar bevare*

goulen : « Reit d'imp hirie hon bara pempdiek » ?

R. Goulen a reomp digand Doue, evit pep devez magadurez d'hon ine ha d'hon c'horf.

G. *Petra eo bara pe magadurez an ine* ?

R. Komzo Doue, graso Doue hag dreist-oll ar gommunion zakr.

G. *Petra c'houlennomp-ni dre a bempet goulen* : « Pardonet d'imp hon offanso, evel ma pardonomp d'ar re ho deuz hon offanset » ?

R. Goulen a reomp bean pardonet gand Doue, evel ma pardonomp d'hon enebourien.

G. *Petra c'houlennomp-ni dre ar c'houl-ec'hevet goulen* : « Na bermettet ked e kouezfemp en dentasion » ?

R. Goulen a reomp bean diwallet diouz an dentasion, pe ar c'hras d'he zrec'hi.

G. *Hag hen zo pec'het kaout tentasion* ?

R. Salokras, mes pec'het eo plegan d'an dentasion.

G. *Petra c'houlennomp-ni dre ar seizvet goulen* : « Mes hon delivret a bep drouk ».

R. Goulen a reomp bean diwallet diouz ar pec'het, ha diouz kemend drouk a oufe ar-ruont ganimp er bed-man hag er bed-all.

G. *Perag e vankomp alies da gaout ar pez a c'houlennomp* ?

R. Abalamour na c'houlennomp ked evel m'eo dleet.

G. *Penoz e tleomp pidi evid ober eur beden vad* ?

R. Gand evez, humilite, intansion bur, ha hep paouez.

*G. *En hano piou e tleomp-ni pidi* ?

R. En hano Jezuz-Krist, ha dre he verito.

KELENNADUREZ

- 1° Trugarekaat Jezuz-Krist da vean disket d'imp pidi.
- 2° Disklerian ar pez zo red evit pidi.
- 3° Na dleer goulen nemed treo mad.

III. KENTEL

Pidi ar Zent, karet hag enori ar Werc'hez.

*G. *Hag hen a zo mad ive pidi hag enori ar Zent* ?

R. Ia, abalamour m'ec'h int mignonet da Zoue, ha ma hellont hon-zikour.

G. *Petra zo red da ober evid enori ar Zent* ?

R. Miret ervad ho gouelio ha heuill ho vertuio.

G. *Perag ec'h enoromp-ni skeudenno pe imajo ar Zent* ?

R. Abalamour ma tigasont d'imp memor deuz ar Zent.

G. *Piou eta a enoromp-ni, pa zaludomp eur c'hrusifi, pe skeuden eur Zant bennag* ?

R. N'eo ked ar skeuden pe ar portret a enoromp, mes an hini zo merket war-n-he.

G. *Perag ec'h enoromp-ni relego ar Zent ?*

R. Abalamour m'ec'h int lod presiuz deuz ho c'horfo zantel.

G. *Piou deuz ar Zent a dleomp-ni da bidi ha da enori ar muian warlec'h Doue ?*

R. Ar Werc'hez Mari, Mam da Zoue, roet d'imp evid Mamm gand hon Zalver.

G. *Ar Werc'hez hag hi a zo bet konsevet hep ar pec'het orijinel ?*

R. Ia, ar Werc'hez a zo bet konsevet hep ar pec'het orijinel ; ha kement-se a zo eun artikl a fe.

G. *Pehini eo ar brasan enor a oufemp da ober d'ehi ?*

R. Kemer skouer war he vertuio.

G. *Pere eo vertuio ar Werc'hez ar re gaëran, hag a dleomp, dreist ar re all, kemer skouer war-n-he ?*

R. Ar garante, an humilite, ar burete.

G. *Petra dleomp-ni pidi ar Werc'hez da c'houlen ar muian evidomp digand Doue ?*

R. Ar pardon deuz hon fec'hejo hag eur maro mad.

G. *Hag hen a zo awalc'h rei eun enor ben-nag d'ar Werc'hez evit bean zalvet ?*

R. Salokras, red eo ive bean gwir zervijer da Zoue.

G. *Pehini eo ar Vreuriezh a zo ar muian, dre oll, zavet en enor d'ar Werc'hez ?*

R. Breuriezh ar Rozera.

KELENNADUREZ

1^o Digand Doue e c'houlennomp graso, hag ar Zent a bedomp d'ho c'haout evidomp.

2^o Pep hini a dle karet ha pidi, dreist ar re all, he El mad, he Zant paeron, ha patronet he barouz.

3^o En em lakaat en Breuriezh ar Rozera, ha kemer ar Werc'hez evid mamm.

IV. KENTEL

An Ave Maria hag ar Chapelet.

*G. *Pehini eo ar beden an dousan da galon ar Werc'hez ?*

R. An Ave Maria, hag a dle an oll da c'hout.

G. *Leret an Ave Maria, en latin.*

R. Ave Maria, gratia plena, Dominus tecum ; benedicta tu in mulieribus, et benedictus fructus ventris tui, Jesus.

Sancta Maria, Mater Dei, ora pro nobis peccatoribus, nunc et in horâ mortis nostræ. Amen.

G. *Leret an Ave Maria, en brezonek.*

R. Me ho salud, Mari, leun a c'hras, an Otro Doue zo ganec'h ; binniget oc'h dreist an oll groage, ha binniget ar freuz dimeuz ho korf, Jezuz.

Zantez Mari, Mamm da Zoue, pedet evi-

domp pec'herien, breman hag en heur deuz hon maro. Evelse beet gret.

G. *Piou en deuz gret an Ave Maria ?*

R. An El Gabriel, zantez Elisabeth hag hon Mamm zantel an Iliz.

G. *Perag e leret an Ave Maria, raktal goude ar Bater ?*

R. Evit kaout digand Doue, dre zikour ar Werc'hez, ar pezh hon euz goulennet er *Bater*.

G. *Leret d'in c'hoaz eur devosion hag a blij meurbed da Zoue ha d'ar Werc'hez ?*

R. Devosion ar *chapelet*.

G. *Penoz e lerer ar chapelet ?*

R. *Credo* a lerer war ar groaz,

Eur *Bater* war bep greunen vraz ;

Ha, dre ma teu ar greun bian,

Lerer eun *Ave* war beb unan.

G. *Petra dleer da zonjal epad ar chapelet ?*

R. Zonjal en unan bennag deuz misterio ar Rozera.

G. *Gant petra eo gret ar Rozera ?*

R. Gand tri *chapelet*.

G. *Pet mister zo er Rozera ?*

R. Pemzek : pomb a joa, pomb a geuz ha pomb a c'hloar.

G. *Leret ar pemp mister a joa.*

R. 1. E oe zaludet ar Werc'hez gand an El ; 2. ec'h eaz da welet e c'hinitervez zantez Elisabeth ; 3. e c'hanaz he Mab ; 4. hen prezantaz d'an Templ ; 5. hen kavaz o tivizout gand an doctoret.

G. *Leret ar pemp mister a geuz.*

R. 1. E c'houezaz Jezuz an dour hag ar gwad ; 2. e oe skourjeet ; 3. e oe kurunet a spern ; 4. e tougaz he groaz ; 5. e oe krusifiet.

G. *Leret ar pemp mister a c'hloar.*

R. 1. E resusitaz hon Zalver ; 2. e pignaz en env ; 3. e tiskennaz ar Speret-Santel ; 4. e oe douget ar Werc'hez en env gand an Ele ; 5. e oe kurunet en env gand an Drindet.

KELENNADUREZ

1^o Disklerian petra eo an *Ave Maria*.

2^o Alian an oll da gaout pep bini eur *chapelet*.

3^o Diski hen laret gand devosion.

V. KENTEL

Pedenno diouz ar mintin.

G. *Penoz e lle eur c'hristen mad tremen he vue ?*

R. O pidi hag o santelaat he obero.

G. *Pegoulz e lleomp-ni pidi ?*

R. En peb amzer ; ha, dreist pep tra, diouz ar mintin ha diouz an noz.

G. *Petra dleer da ober diouz ar mintin, pa zifuner ?*

R. Ober zin ar groaz, ha laret : *Ma Doue, ma C'hrouer, me rô d'ec'h ma c'halon.*

G. *Ha goude bezan zavet a gwisket ?*

R. Kemer dour binniget ha laret ar peddenno war an daoulin.

G. *Lerei ar beden diouz ar mintin.*

R. Ma Doue, me gred fermamant, etc. (*er fin ar C'hatekiz*).

KELENNADUREZ

1° En em wiskan deread.

2° Rei d'anaveout ervad d'ar vugale ha d'ar re vraz petra eo an akto a Fe, etc.

3° Pedenno diouz ar mintin, dever braz meurbet !

VI. KENTEL

Obero eur c'hristen epad an de.

G. *Petra dleer da ober, pa groger en eul labour bennag ?*

R. Ober zin ar groaz, ha laret : *Ma Doue me ro d'ec'h al labour-man ; skuillet war-n-han ho pennoz, mar plij ganec'h.*

G. *Petra dleer da laret, pa c'houzanver eur boan bennag a gorf pe a speret ?*

R. Laret : *Ma Jezuz, me rô d'ec'h ar boan-man, evid enori ho maro hag ho pasion ?*

G. *Petra dleer da laret pa zanter eun dentasion bennag ?*

R. Laret, hep dale, da vianan a galon : *Jezuz ha Mari, ma zikouret.*

G. *Petra dleer da ober, pa zanter bean koueet en eur pec'het bennag ?*

R. Ober eun akt a gontrision, ha mont da govesaat kentan ma heller.

G. *Petra dleer da ober, arog ar pred ?*

R. Ober zin ar groaz ha laret : *Ma Doue, binniget ar boed ec'h an da gemer evid derc'hel da vevan en ho servij.*

G. *Petra dleer da laret, goude ar pred ?*

R. Laret : *Ma Doue, me ho trugareka dimeuz ar boed am euz kemeret evid derc'hel da vevan en ho servij.*

G. *Petra dleer da laret, pa dremener eun Iliz e lec'h ma ve ar Zakramant ?*

R. Laret : *Meulet ra vezo Jezuz en Zakramant adorabl deuz an Oter !*

G. *Petra dleer da laret pa dremener eur chapel ?*

R. Laret : *Me ho ped oll, Zent ha Zentezed, da vean ma avokadet.*

G. *Petra dleer da laret pa dremener eur groaz bennag ?*

R. Me ho zalud, kroaz vinniget,

Ha kement kroaz a zo er bed,

'Balamour d'am Zalver binniget

Zo bet er groaz krusifiet.

G. *Petra dleer da laret, pa glever an holeraj o son ?*

R. Ober zin ar groaz ha laret : *Ma Doue, reit d'in ar c'hras n'hoc'h offansin biken.*

G. *Petra dleer da ober, pa gaser ar Zakramant da eun den klanv ?*

R. Mont gant-han, mar geller ; ha, ma

n'heller ket, stoui d'an daoulin, da adori ar Zakramant ha da bidi evid an den klanv.

G. *Petra dleer da laret, pa zôn ar c'hlaç ?*

R. Laret an *De profundis*, pe eur *Bater* evid an anaon.

KELENNADUREZ

1° An disteran poan, an disteran trubuil a hell bean zanteleet.

2° Laret an *Anjelus* ter gwech bembe, evid gonid an induljans.

3° Kaout eur muzul ebarz an dibri hag an evan.

VII. KENTEL

G. *Petra dle eur c'hristen da ober diouz an noz ?*

R. Laret he bedenno evel diouz ar mintin.

G. *Leret ar pedenno diouz an noz.*

R. Ma Doue, me gred fermamant, etc. (*er fin ar C'hatekiz*).

G. *Ha n'eo ket mad, neuze, laret litanio ar Werc'hez ?*

R. Ia, eur beden deuz ar re wellan eo, evit kaout eur maro mad.

G. *Pehini eo ar wellan feson da ober ar beden diouz an noz ha diouz ar mintin ?*

R. Ober anehi e kommun ; da laret eo, oll asamblez.

G. *Petra dleer da ober kent mont er gwele ?*

R. Kemer dour binniget hag ober zin ar groaz.

G. *Ha pa ver er gwele, prest da gousket ?*

R. Ober adarre zin ar groaz ha laret : *Ma Doue, me rekommand d'ec'h ma ine.*

KELENNADUREZ

1° Alian da laret ar beden e kommun.

2° Ar gwele a zo henvel deuz ar be, hag ar c'houket henvel deuz ar maro.

3° Kousket war eur zonz vad bennag.



RESUREKSION HON ZALVER JEZUZ-KRIST

Jezuz-Krist resusitet en em ziskoue 1° d'he Vamm zantel ;
2° da Vari Valaden ; 3° da zant Per ; — Ar groage zantel e
kichen he Ve.

TERVED LODEN

WAR AR PEZ A DLEOMP DA OBER

I. KENTEL

*G. *Petra dleomp-ni da ober ?*
R. Ar pez a zo gourc'hemenet gand Doue
ha gand an Iliz.

G. *Pet gourc'hemen en deuz gret d'imp-ni
an Otro Doue ?*

R. Dek, hag a dle an oll da c'hout.

*G. *Leret gourc'hemeno Doue.*

- R.
1. Eun Doue hepken 'adori
Ha dreist pep tra oll a gari.
 2. Doue en ven na doui ked,
Na netra oll dimeuz ar bed.
 3. Ar zulio zantel a viri,
Evid Doue ma serviji.
 4. Da dad, da vamm a enori,
Evit pell amzer ma vevi.
 5. Muntrer na vi e nep feson,
Nag a efet, nag a galon.
 6. Diwal deuz al lubrisite,
Hag a gorf, hag a volonte.
 7. Domaj ebed da zen na ri ;
Ha, mar-t-euz gret. hast repara.
 8. Gevier, na nep fals testeni,
Mir birviken na liviri.
 9. Na c'hoanta dre luksur pec'hi,
Nag e sonj vil 'n em bliji.
 10. Mado re-all na zezir ked
Ho c'hemeret hep lealded.

*G. *Hag hen zo hini a c'hourc'hemeno Doue ha n'hellomp ket miret ?*

R. Salokras ; na zo hini, gant gras Doue, a dleomp da c'houlen dre verito Jezuz-Krist.

G. *Petra eo ar c'hras ?*

R. Eun donezon dreist natur, roet d'imp gand Doue, dre vadelez hepken, diwar merito Jezuz-Krist, evit zikour d'ober hon zilvidigez.

*G. *Hag hen zo ret miret oll gourc'hemeno Doue ?*

R. Ia, ha gwall derri unan a zo awalc'h evit meritout an Ifern.

G. *Petra bromet Doue d'ar re a viro he c'hourc'hemeno ?*

R. Ar Baradoz.

G. *Na d'ar re ho zorro ?*

R. An Ifern.

G. *Petra lar, en daou c'hir, gourc'hemeno Doue ?*

R. Karet Doue ha karet an nesan.

KELENNADUREZ

1° Laret bemde gourc'hemeno Doue, hag ar c'hoant hon euz d'ho miret.

2° Diski d'ar re all gourc'hemeno Doue.

3° Pesort pec'het eo laret evelhenn : *N'hellan ket harz da vont en koler, da douet Doue ?*

II. KENTEL

War ar c'hentan gourc'hemen.

1. Eun Doue hepken 'adori, ha dreist pep tra oll a gari.

G. *Petra eo adori Doue ?*

R. Hen anaveout hag hen enori evel hon C'hrouer hag hon huellan Mestr.

G. *Gret eun akt a adorasion ?*

R. M'hoc'h ador, Doue ma C'hrouer ;

M'hoc'h ador, Jezuz ma Zalver ;

C'houi eo ma Mestr ha ma Roue,

Ha d'ec'h ôn oll, korf hag ine.

G. *Penez ec'h adoromp-ni an Otro Doue ?*

R. Dre ar vertuio theologal, da dre ar vertu a relijion.

G. *Pet vertu theologal zo ?*

R. Ter : ar fe, an esperanz hag ar garante.

G. *Perag int-hi hanvet theologal ?*

R. Abalamour ma renont an ine eeun da Zoue.

G. *Petra eo ar fe ?*

R. Eun donezon digand Doue hag a ra d'imp kredi enhan, hag ar wirioneo en deuz diskleriet d'he Iliz.

G. *Hag hen eo red kaout ar fe evit bean zalvet ?*

R. Ia ; rag anez ar fe n'heller ket plijout da Zoue.

G. *Petra dleer da zonjal diwarbenn ar re a lenn, heb permission, levrio didoue pe dife ?*

R. Dleout a reer zonjal e wall-bec'hont hag emaint war an hent da goll ho fe.

G. *Petra dleer da zonjal diwarbenn ar re en em laka e breuriez ar Franmasonet ?*

R. Dleout a reer zonjal e reont eur gwall-bec'hed hag e maint e-meaz deuz an Iliz.

G. *Gret c'hoaz eun akt a fe war an oll wirioneo deuz ar fe.*

R. Me a gred ferm, ô ma Doue,
An oll artiklo deuz ar fe ;
Rak c'houi oc'h euz revelet,
Hag a zo gwirion pa gomzet ;
Hag an Iliz a bropoz d'in
An artiklo-ze da gredi.

G. *Petra eo an esperanz ?*

R. Eun donezon digand Doue hag a ra d'imp esperi he c'hras er bed-man, hag he c'hloar er bed-all, dre verito Jezuz-Krist hag hon obero mad.

G. *Pere eo ar viso kontel d'an esperanz ?*

R. An dizesper' hag ar brezomsion.

G. *Leret d'in ar voïen da vagan ha da grenvaat hon esperanz ?*

R. Ober ervad orezon.

G. *Gret eun akt a esperanz.*

R. Ma Doue, ma oll esperanz,

En-hoc'h eman ma oll fianz
Me esper digand ho madelez

Gras d'ober ma zilvidigez,
Dre zikour Jezuz, ma Otro,
Mar miran ho kourc'hemeno.

G. *Petra eo ar garante ?*

R. Eun donezon digand Doue hag a ra d'imp hen karet dreist pep tra, abalamour d'ehan he-unan, hag hon nesan evel-d-omp hon-unan abalamour da Zoue.

G. *Petra eo karet Doue dreist pep tra ?*

R. Rei d'ehan ar breferans, hag ar plas kentan en hon c'halon.

G. *Piou eo hon nesan ?*

R. Ar bed oll, ha kement a hell bean zalvet.

G. *Petra eo karet an nesan ?*

R. Dezirout hag ober vad d'ehan evel d'imp ho-unan.

G. *Petra eo ar vertu a relijion ?*

R. Eur vertu gaer meurbet ec'h enorer dre-z-hi Doue evel ma eo dleet.

G. *Petra c'hourc'hemen c'hoaz ar vertu-ze, ouspenn enori Doue ?*

R. Gourc'hemen a ra c'hoaz enori ar Werc'hez, an Ele hag ar Zent, ha respeti an dud zakr, hag an treo zakr ha binniget.

G. *Perag e tleer enori ar Werc'hez dreist an oll Zent-all ?*

R. Abalamour ma eo ar Werc'hez Mamm da Zoue ha dre-se Rouanez an oll Zent.

G. *Perag e tleer enori zant Joseph dreist re-all ?*

R. Abalamour ma eo zant Joseph pried d'ar Werc'hez, tad mager d'hon Zalver ha penn-tiegez d'ar famill-zantel.

G. *Pere eo ar pec'hejo a reer eneb ar vertu a relijion ?*

R. An idolâtri, ar zorserez, an divinerez, ar superstision hag ar zakrilej.

KELENNADUREZ

- 1^o Ober aliez akto a fe, a esperanz hag a garante.
- 2^o Laret petra eo ar pec'hejo a-eneb ar relijion.
- 3^o Disklerian an eûz a dleer kaout evid ar levrio fall.

III. KENTEL

War an eil hag an drived gourc'hemen.

2. Doue en ven na doui ked, na netra oll dimeuz ar bed.
3. Ar zulio zantel a viri evid Doue ma serviji.

G. *Petra difenn Doue ouzomp-ni dre an eil gourc'hemen : Doue en ven, etc. ?*

R. Difenn a ra ouzimp ar blasfemo, al leodouet, hag an drouk-pedenno.

G. *Petra eo ar blasphem ?*

R. Eur gomz injuriuz da Zoue, d'ar Zent pe d'ar relijion.

G. *Hag hen eo eur profit braz d'an dud blasphem ?*

R. Salokras ; e keit-se e tennont war-n-he koler an Otro Doue.

G. *Hag hen oar ar vugale ive blasphem ?*

R. Ia, koulz hag ar re vraz ; rag gant-he e tiskont.

G. (1) *Petra eo touet Doue ?*

R. (1) Kemer Doue da dest.

G. *Neb en deuz touet ober eun drouk ben-nag, ha red eo d'ehan hen ober ?*

R. Salokras ; ober a rafe eur pec'hed all.

G. *Petro eo drouk pidi ?*

R. C'hoantaat drouk d'imp hon-unan pe d'ar re-all.

G. *Pa ve gret gwestl da Zoue, ha red eo ober ar pez a zo gwestlet ?*

R. Ia ; mes na dleer ked ober gwestlo re vuan.

G. *Petra c'hourc'hemen Doue d'imp-ni dre an drivet gourc'hemen : Ar zulio zantel, etc. ?*

R. Gourc'hemen a ra d'imp tremen an deïo-ze zantelamant.

G. *Petra zo red da ober evit zantifian ar zulio ?*

R. Serviji Doue, ha chom hep labourat.

G. *Petra eta a dle eur c'hristen mad da ober an deïo-ze ?*

R. Bean aketuz d'an ofiso divin, tostaat d'ar zakramancho, pidi Doue, hag ober evro mad.

G. *Petra leret-hu deuz ar re dremen an*

(1) Ar Goulen hag ar Respond-se en em gave diagent eun tamik hueloc'h ; aman en em gavont en ho flas.

deïo-ze er marc'hajo, er c'hoario, en hostellerio ?

R. Kristenien fall int, ha profanatourien an deïo zantel.

G. *Pere eo al labourio difennet d'ar zul ?*

R. Ar re a rô mui a boan d'ar c'horf evid d'ar spered.

G. *Ha bean zo eul labour gorf bennag hag a heller ober d'ar zul ?*

R. Ia, al labour a zo red evid ozan boed, an de-se, d'an dud ha d'al loened, ha lakaad urz-ebartz an ti.

KELENNADUREZ

1° Disklerian pegen braz pec'hejo eo ar blasphemo, al leodouet hag an drouk-pedenno.

2° Goulen permission, mar zo ezom da labourat da zul pe da ouel.

IV. KENTEL

War ar bevarvet hag ar bempet gourc'hemen.

4. Da dad, da vamm a enori, evit pell amzer ma vevi.
5. Muntreer na vi en nep feson, nag a efet, nag a galon.

G. *Petra c'hourc'hemen Doue d'ar vugale dre ar bevarvet gourc'hemen : Da dad, da vamm, etc. ?*

R. Karet ho zud, ho doujan, zenti out-he hag ho zikour en ho ezomo a gorf hag a ine.

G. *Hag hen a dle eur bugel zenti ouz he dud en pep tra ?*

R. Ia, nemet gourc'hemenet a ve d'ehan eun drouk bennag.

G. *Petra dle ive an tado hag ar mammo d'ho bugale ?*

R. Ho magan, ho c'helennan, ho c'horijan ha diskoue d'he skouer vad.

G. *Hag hen zo gourc'hemenet enori re-all, ouspenn an tado hag ar mammo ?*

R. Ia, ar mestro, ar mestrezet, hag an oll superioret.

G. *Petra a dle bean ar mestro, ar mestrezet hag ar zervijerien an eil e kenver egile ?*

R. Tost awalc'h ar pez a dle bean etre-zhe ar vugale hag ho zud.

G. *Ha red eo d'ar vugale ive enori ho les-tad, ho lesvamm, ho c'hurador, ho zad kaër, ho mamm-gaër, hag ho c'herent all, herve ho oad hag ho otorite ?*

R. Ia, red eo d'he ho enori.

G. *Pere eo ar superioret all a dleer da enori ?*

R. Ar Pab, an Eskibien, an oll dud a Iliz hag ar re zo lekeet da c'houarn ar vro.

G. *Pere eo hon deverio e kenver ar re a c'houarn ar vro ?*

R. Ho respeti ha zenti out-he en kement tra n'eo ked enep lezen Doue.

G. *Perag e tleomp-ni ho respeti ha zenti out-he ?*

R. Abalamour ec'h eo digand Doue e teu pep galloud ha peb otorite, hag e renker kaout gouarnamant ha mistri er vro, evid derc'hel an urz vad e-touez an dud.

G. *Er broio el lec'h e ren lezen ar votadeg, hag hen eo eun dever mont da voti ?*

R. Ia, eun dever eo peurvuian.

G. *Herve petra a tle ar c'hristen rei he vouez er votadeg ?*

R. Herve he gonsianz.

G. *Eur pec'hed eo eta trei er votadeg gand enebourien ar relijion hag ar fe ?*

R. Ia, eur pec'hed eo.

G. *Da biou e tleomp rei hon mouez er votadeg ?*

R. D'ar re a hell hag a dle ober ar gwel-lan mad d'ar vro evid ar bed-man hag evid ar bed all.

G. *Petra difenn Doue ouzimp-ni dre ar bempet gourc'hemen : Muntrer na vi en nep feçon, ect. ?*

R. Difenn a ra ouzimp lac'han ha blesan den ebed, pe en he gorf pe en he ine, ha kaout c'hoant d'hen ober.

G. *Penez e lac'her ine an nesan ?*

R. O rei d'ehan skouer fall, pe o tougen anehan d'ar pec'het marvel.

G. *Penez e c'heller bean muntrer a galon ?*

R. Dre ar valis, ar venjans, ar gasoni hag an anvi.

G. *Gourc'hemenet eo d'imp eta gand ar bempet gourc'hemen karet an oll ?*

R. Ia, memes hon enebourien.

G. *Petra dleomp-ni ober e kenver hon enebourien ?*

R. Pardonni d'ezhe a galon,
Komz out-he evel gwir vignon.

Ouspenn, 'balamour da Zoue,

Ho c'haret hag ober vad d'he ;

Lezel hep drouk-komz anezhe

Ha pidi Doue evit-he.

KELENNADUREZ

1° Diskouel ho c'harg d'an tado, d'ar mammo ha d'ar vugale, d'ar mestro, mestrezet ha zervijerien, etc.

2° Ar c'homzo noazuz ha dismegansuz na dlefent ket kouean a c'heno eur pagan honest zoken.

3° Gouzav an dismeganso abalamour da Jezuz-Krist.

V. KENTEL

War ar c'houec'hvet hag an navet gourc'hemen.

6. Diwall deuz al lubrisite hag a gorf hag a volonte.
9. Na c'hoanta dre luksur pec'hi, nag e sonj vil na n'em bliji.

G. *Petra difenn Doue ouzimp-ni dre an daou gourc'hemen-man : Diwall deuz al lubrisite, etc. ?*

R. Difenn a ra ouzimp ar zonjo, an dezirio, ar c'homzo hag an obero dizhonest, hag an okasion da gouean en-he.

G. *Pec'het eo eta kaout zonjo dizhonest ?*

R. Ia, mar konsant ar galon d'he.

G. *Pere eo ar gwasan okasiono evid ar pec'hed a impurete ?*

R. Ar wall gompagnonez, an ebato, an didalvedigez hag ar gourmandiz.

G. *Hag en eo drouk braz ive kanan, lenn pe zellet treo impudik ?*

R. Ia ; rag en em lakaat a reer en risk braz da goll ar burete.

G. *Leret d'in eur voien bennak da viret ar burete a gorf hag a galon ?*

R. Mortifian ar c'horf, bean devot d'ar Werc'hez, choaz eur c'hovezour zantel ha pellaat deuz an okasion.

KELENNADUREZ

1° Diskouel pegen euzuz eo an an impurete.

2° Trec'hi ar vez fall er govizion.

3° Diskoue e plij meurbed da Zoue an den modest ha pur.

VI. KENTEL

War ar seizvet hag an dekvvet gourc'hemen.

7. Domaj ebet da zen na ri ; ha, mar-t-euz gret, ^{bast repara.}
10. Mado re-all na zezir ket bo c'hemeret hep lealdet.

G. *Petra difenn Doue ouzimp-ni dre an daou gourc'hemen-man : Domaj ebet da zen na ri, etc.*

R. Difenn a ra ouzimp ober gaou ebet ouz den, ha kaout c'hoant d'hen ober.

G. *En pet feson e c'heller ober gaou ouz an nesan ?*

R. En teir feson : o tomaji, o laërez, pe o viret he dra hep lealdet.

G. *Hag hen zo awalc'h kouseat ar gaou a ve gret ouz an nesan ?*

R. Salokras ; red eo dic'haoui, mar gëller, pe bean daonet.

G. *Pegoulz eo red dic'haoui ?*

R. Kentan ma heller.

G. *Piou a dle dic'haoui ?*

R. Kement hini a zo bet kiriek d'an domaj.

G. *Nag an uzulierien ?*

R. Red eo d'he ive dic'haoui, pe bean daonet.

G. *Petra eo an uzulierez ?*

Gr. Cath. bret.

R. Ar gonid re vraz a denner euz arc'hant prestet.

G. *Ha red eo d'imp ive ober an aluzen ?*

R. Ia ; red eo da bep hini herve he zanve hag ezomo ar paour.

G. *Hag ar re baour petra dleont ober ?*

R. Diwall d'ober klemm euz ho stad, ha da gaout anvi euz ar re all, mes pidi evid ar re a rô d'he an aluzen.

KELENNADUREZ

- Diskoue 1° Eo red dic'haoui,
2° Piou e tleer dic'haoui,
3° Ec'h eo an uzulierez eun displealded,
4° Hag eo red ober aluzen.

VII. KENTEL.

War an eizvet gourc'hemen.

8. Gevier, na nep fals testeni, mir birviken na liviri.

G. *Petra difenn Doue ouzimp-ni dre an eizvet gourc'hemen : Gevir na nep fals testeni, etc. ?*

R. Difenn a ra ouzimp ar gevier, ar fals testeni, an drouk-komz hag ar varn re vuan.

G. *Petra eo ar gaou ?*

R. Eur gir eneb ar pezh a zonzjer, gant c'hoant da dromplan.

G. *Hag hen e c'heller a-wecho laret gevier ?*

R. Salokras ; na pa ve evid diwall ar vue.

G. *Hag hen eo pec'het braz dougen fals testeni ?*

R. Ia, eur pec'het ken braz eo, ken n'hell ked an oll govesourien rei an absolven anehan.

G. *Ha red eo d'ar fals test repari ar gaou en deuz gret ?*

R. Ia, mar gell en eur feson bennak.

G. *Petra eo an drouk komz ?*

R. Eur gwal deodad, displeal, ha noazuz d'an nesan.

G. *En pet feson e c'heller drouk komz ?*

R. En diou feson : en gwir hag en gaou.

G. *Hag hen eo pec'het braz drouk komz hag en gwir hag en gaou ?*

R. Ia, rag an enor a zo dreist an arc'hant hag an aour.

G. *Pec'het eo ive chilaoui gwall deodo ?*

R. Ia, dreist pep tra pa assanter ganthe.

G. *Hag hen eo awalc'h kovesaat an drouk-komz ?*

R. Salokras ; red eo ive he repari gwellan ma heller.

G. *An hini en deuz drouk komzet en gaou, petra dle-han da ober ?*

R. En em dislaret.

G. *Petra eo barn re vuan ?*

R. Drouk sonjal heb abek diwarbenn an nesan.

KELENNADUREZ

- 1^o Rei kasoni enep d'ar gevier ha d'an drouk komz.
- 2^o Beañ gwirion en hon c'homzo hag en hon obero.
- 3^o Diskoue pegen braz pec'het eo klask tromplan Doue.

VIII. KENTEL

War gentan gourc'hemen an Iliz.

1. Kleo devotamant penn-da-benn, hep sul, bep gouel, an oferen.

G. *Hag hen eo awalc'h miret gourc'hemen Doue evit bean zalvet ?*

R. Salokras ; red eo ive miret gourc'hemen an Iliz.

G. *Digant piou e teu otorite an Iliz ?*

R. Digant Jezuz-Krist.

G. *Pet gourc'hemen en deuz gret d'imp-ni an Iliz ?*

R. C'houec'h, hag a dle an oll da c'hout.

G. *Leret gourc'hemen an Iliz.*

1. Kleo devotamant penn-da-benn,
Bep sul, bep gouel, an oferen.
2. Santifian ri ar gouelio,
War ho hed, evel ar zulio.
3. Koves da bec'hejo hep mez,
Da vianan peb bla, eur wech.
4. Korf da Zalver a resevi,
En amzer Bask, hep differi
5. Iun a ri an daouzek deio,
Ar c'horañz, hag ar vijilo.
6. Da wener kig ne zibri ked,
Nag ive da zadorn nep pred.

G. *Petra lar d'imp-ni ar c'henta gourc'hemen : Kleo devotamant, etc. ?*

R. Klevet an oferen penn-da-benn d'ar zulio ha d'ar gouelio berz.

G. *Petra eo an oferen ?*

R. Sakrifis korf ha gwad Jezuz-Krist.

G. *Petra eo eur zakrifis ?*

R. Eur prof pe eur c'hinnig gret da Zoue.

G. *Piou a ginnig ar zakrifis-se da Zoue ?*

R. Jezuz-Krist he unan, dre zaouarn ar belek.

G. *Jezuz-Krist eta a zo belek ?*

R. Ia, bean eo ar belek huellan hag ar viktim asambles.

G. *Evit petra en deuz gourc'hemenet Jezuz-Krist laret an oferen ?*

R. Evit ma vo diskoueet ha ma pado he zakrifis war ar groaz.

G. *Evit piou en em ginnig Jezuz-Krist en oferen ?*

R. Evid ar re veo hag ar re varo.

G. *Eun dra gaër eta eo en oferen ?*

R. Ia, na zo netra kaeroc'h war an douar hag en env.

G. *Penos e tleer bean an oferen ?*

R. Gant modesti ha devosion.

G. *Gant pesort intansion e tleer beanen oferen ?*

R. Gant intansion an Iliz.

G. *Pesort intansion en deuz an Iliz ?*

R. Adori Doue, hen trugarekaat, goulen he c'hraso ha terri he goler.

G. *Gret eun akt evid unani hoc'h intansion gant hini an Iliz ?*

R. Me rô da Zoue ar zakrifis,
Gant intansion an Iliz,
Hag a zezir kommurian
Gand ar belek en ofern-man.

G. *Petra eo ar gwellan zonjal en-han epad an oferen ?*

R. Maro ha Pasion hon Zalver.

G. *Pesort akt a leret-hu er goureo ?*

R. Me hoc'h ador, ô ma Jezuz !
O korf sakr, ô gwad presiuz,
Keset ganec'h beteg an env
Homaj ma c'horf ha ma ine.

G. *Pesort oferen a dleer da glevet, dreist ar re-all, aliesan ma heller ?*

R. An oferen bred.

G. *Leret d'in, en daou c'hir, dever eur parouzian mad ?*

R. Karet he iliz-parouz, ha doujan he bastor hag he veleien.

KELENNADUREZ

1° Diskoue ar feson da glevet devotamant an oferen.

2° Disklerian pegen talvouduz eo an oferen.

3° Diskoue eo red dont d'an oferen bred, ha bizitan alies an Iliz-parouz.

IX. KENTEL

War ar pemp gourc'hemen all.

G. *Petra lar an eil gourc'hemen : Santifian ri ar gouelio, etc. ?*

R. Gourc'hemen a ra d'imp santifian ar gouelio berz evel ar zulio.

G. *Petra lar an drived gourc'hemen : Koves da bec'hejo, etc. ?*

R. Kovesaat eur wech er bla da nebeutan, didan boan a bec'het marvel.

G. *Da be n-oad e tleer kas ar vugale da govesaat ?*

R. War dro an oad a zeiz vla, pa ouzont pec'hi.

G. *Petra lar ar bevaret gourc'hemen : Korf da Zalver, etc.*

R. Kommunian da Bask, en hon farouz, ha n'eo ked el lec'h all hep permission.

G. *Petra lar ar bempet gourc'hemen : Iun a ri, etc. ?*

R. Iun ar c'hoaraiz, an daouzek deño hag ar vijilo merket.

G. *Piou zo gourc'hemenet d'he iun ?*

R. Ar re ho deuz eur bla war-n-ugent ; nemed ar gozni, ar c'hlenved, pe ho labourio stard a virfe outhe.

G. *Petra zo red evid iun ?*

R. Chom hep dibri kig, ha tremen gand eur pred bemde hag eur goan vian da nôz.

G. *Nep ne hell ked ober ar iunio war ho hed, hag hen zo diskarg euz an oll ?*

R. Salokras ; pep hini a dle ober herve he c'halloud.

G. *Petra lar ar c'houec'hvet gourc'hemen : Da wener, kig, etc. ?*

R. Tremen heb dibri kig da wener ha da zadorn.

G. *Perak da wener ?*

R. Evid enori Pasion ha maro hon Zalver.

G. *Perak da zadorn ?*

R. Evid enori ar Werc'hez hag en em bre-pari d'ar zul.

G. *Ha red eo d'imp miret gourc'hemeno an Iliz ?*

R. Ia ; rak nep na zent ked ouz an Iliz, hon Mamm, n'hell ket bean gwir vugel da Zoue.

G. *An Iliz ha hi hell en em dromplan en he c'helennadurez ?*

R. Salokras ; rak sklerijenet eo gand ar Speret-Santel.

KELENNADUREZ

1^o Alian da govesaat ha da gommunian alies.

2^o Diskoue ec'h eo red zenti d'an Iliz, kredi hag ober ar pezh a lar.

X. KENTEL

War ar Pec'het.

*G. *Penoz e torrer gourc'hemeno Doue ha re an Iliz ?*

R. Dre ar pec'het, brasan drouk zo er bed.

*G. *Petra eo ar pec'het ?*

R. Kement zo enep gourc'hemeno Doue ha re an Iliz.

G. *Petra eo ar pec'het orijinel ?*

R. An hini a zeu ganimp war an douar, evel bugale da Adam.

G. *Penoz e ve lamet ar pec'het orijinel ?*

R. Dre ar Vadeiant.

G. *Petra eo ar pec'het aktuel ?*

R. An hini a reomp ac'hanomp hon-unan.

G. *En pet feson e c'heller pec'hi ?*

R. En peder : dre zonzj, dre gomz, dre ober ha dre omision.

G. *Petra eo pec'hi dre omision ?*

R. Mankout da ober ar pezh zo gourc'hemenet.

G. *Pet sort pec'het aktuel zo ?*

R. Daou : ar pec'het veniel hag ar pec'het marvel.

G. *Petra eo ar pec'het veniel ?*

R. Ar pec'het ha na lem ket diganimp gras Doue, mes he bianaat e ra.

G. *Petra eo ar pec'het marvel ?*

R. An hini a lem diganimp gras Doue, hag a ra d'imp meritout an ifern.

*G. *Pet pec'het marvel zo red evit bean daonet ?*

R. Mervel gand unan hepken a zo awalc'h evit bean daonet.

KELENNADUREZ

1° Pidi Doue d'hon diwall deuz ar pec'het marvel.

2. Kerkent ma santer bean koueet er pec'het marvel, ober eun akta gontrision, ha kovesaat kentan ma heller.

3° Diwall deuz ar pec'het veniel, a lemm nerz digand an ine.

XI. KENTEL

War ar pec'hejo kapital

G. *Petra eo eur pec'het kapital ?*

R. Eun tech fall, mammem da gals a bec'hejo all.

G. *Pet pec'het kapital zo ?*

R. Seiz.

G. *Pere int-hi ?*

R. Ourgouil, Avariz, Luksur, Anvi, Gourmandiz, Koler ha Diegi.

G. *Petra eo an Ourgouil ?*

R. Eun estim re vraz ac'hanomp hon unan, hag a ra d'imp disprizout ar re all.

G. *Petra eo an Avariz ?*

R. Eur stag direiz ouz mado an douar.

G. *Petra eo al Luksur ?*

R. Pec'het mezuz an impurete.

G. *Petra eo an Anvi ?*

R. Eun distridigez a vad hon nesan, dre ma kredomp hon euz mui a verit evit-han.

G. *Petra eo ar Gourmandiz ?*

R. Eur c'hoant direiz da zibri pe da evan.

G. *Petra eo ar Goler ?*

R. Eur bar-kounar eneb an nesan, hag eur c'hoant direiz d'en em venji.

G. *Petra eo an Diegi ?*

R. Eun dic'hout pe eul leziregez hag a ra d'imp lezel hon dever da ober.

G. *Pehini eo kentan remed d'ar pec'hejo kapital ?*

R. Pratikan a vertuio a zo enep d'he.

G. *Pesort vertu zo enep d'an ourgouil ?*

R. An humilite.

G. *Ha d'an avariz ?*

R. Largente.

G. *Ha d'al luksur ?*

R. Purete.

G. *Ha d'an anvi ?*

R. Karante.

G. *Ha d'ar gourmandiz ?*

R. Temperans.

G. *Ha d'ar goler ?*

R. Dousder.

G. *Ha d'an diegi ?*

R. Devosion.

KELENNADUREZ

- 1^o Pec'hejo veniel a reer dre ourgouil, avariz, etc.
- 2^o Ebarz an impurete na zo nemeur a bec'hejo veniel.
- 3^o Disklerian ar vertuio a zo enep d'ar pec'hejo kapital.
- 4^o Lakaat evez da ober brezel d'ar pec'het mignon.

XII. KENTEL

War bevar fin divezan an den.

G. *Leret d'in c'hoaz eur remed mad meurbed eneb d'ar pec'het ?*

R. Zonjal alies er pevar fin divezan.

G. *Pere int-hi ?*

R. Ar Maro, ar Varn, an Ifern hag ar Baradoz.

*G. *Petra eo ar maro .*

R. An disparti etre ar c'horf hag an ine.

G. *Leret d'in eur voien da gaout eur maro mad ?*

R. Kaout eur vue vad.

G. *Pet sort Barn a zo ?*

R. Daout sort : ar Varn bartikulier hag ar Varn jeneral.

G. *Petra eo ar Varn bartikulier ?*

R. Ar zetans a rô Doue d'an ine raktal goude maro an den.

G. *Petra eo ar Varn jeneral ?*

R. Ar zetans publik a zisklerio hon Zalver d'an oll er fin ar bed.

*G. *Leret d'in ar voien da gaout neuze eur zetans vad ?*

R. Diwall da varn den re vuan ; hag en em varn hon unan.

G. *Petra eo an Ifern ?*

R. Eur prizon spontuz karget a bep sort poanio eternal.

G. *Pehini eo brasan poan zo en Ifern ?*

R. Chomp hep gwelet na karet Doue da viken.

G. *Leret d'in c'hoaz unan bennag a boanio an Ifern ?*

R. Bean o leski korf hag ine, epad an eternite.

G. *Petra dleer da zonjal ha da ober evid en em viret da gouean en Ifern ?*

R. Zonjal alies en Ifern, ha diwall da gouean er pec'het marvel.

*G. *Petra eo ar Baradoz ?*

R. Eul lec'h delisiuz a evurusdet eternal o welet Doue fas ouz fas.

*G. *Petra zo red ober evid mont d'ar Baradoz ?*

R. Miret gourc'hemeno Doue ha re an Iliz.

KELENNADUREZ

1^o Pegen danjeruz eo dalean da govesaat beteg ar maro !

2^o En em varn bemde dre an eksamen a gonsianz.

3^o Petra eo bean kollet Doue ? Petra eo leski, dizesperi, kounnari, blasfemi hed an eternite ?

4^o Baradoz ! ô kaëran gir !



ASANSION HON ZALVER

An Ele a zigemenn eman Jezuz o pignal d'an Eav hag a gan d'Ean meulodi.

PEDERVED LODEN

WAR AR PEZ A DLEOMP DA RESEV

I. KENTEL

War an oll Zakramancho.

- G. *Petra dleomp-ni da resev.*
 R. *Ar Zakramancho.*
 G. *Petra eo euz Zakramant ?*
 R. *Eur zin a weler deuz ar c'hras ne weler ked, a zeu d'imp digand Jezuz-Krist, evit santifian hon ineo.*
 G. *Pehini eo ar zin a weler e zakramant ar Vadeiant ?*
 R. *An dour a walc'h ar bugel, hag a zinifi ar c'hras a zeu er memes amzer da walc'hi he ine.*
 G. *Piou en deuz instituet ar Zakramancho ?*
 R. *Jezuz-Krist, pa oa war an douar.*
 G. *Penoz e c'hell ar Zakramancho rei d'imp-ni ar c'hras ?*
 R. *Dre verito ha maro Jezuz-Krist.*
 G. *Hag hen a rô Doue he c'hras da gemend a resev ar Zakramancho ?*
 R. *Ia, mar ho resevont evel ma eo dleet.*
 G. *Hag ar re ho resev fall, pesort pec'hel a reont-hi ?*

R. Ober a reont eur zakrilej.

G. *Petra eo eur sakrilej ?*

R. Profanasion eun dra santel.

*G. *Pet Zakramant zo en Iliz ?*

R. Seiz : Badeiant, Konfirmasion, Pini-
jen, Zakramant an Oter, Nouen, Urz ha
Priedelez.

G. *Ped ha pere anhe n'heller resev ne-
med eur wec'h ?*

R. Tri : ar Vadeiant, ar Gonfirmasion
hag an Urz.

G. *Perak n'heller resev an tri Zakra-
mant-se nemed eur wech ?*

R. Abalamour ma lekeont en ine eur
c'harakter, eur merk ha n'hell ket bean la-
met.

KELENNADUREZ

1° Trugarekaat Jezuz-Krist da vean instituet ken lies
a Zakramant evid hon santifian.

2° Diskoue pegen euzuz eo ar zakrilej.

II. KENTEL

War ar Vadeiant.

G. *Petra eo zakramant ar Vadeiant ?*

R. Eur zakramant a lem ar pec'het oriji-
nel, hag hon gra kristenien, bugale da
Zoue ha d'an Iliz.

G. *Petra brometomp-ni en hon Badeiant ?*

R. Prometi a reomp trei kein da Satan,

p'he obero ha d'he bompo, ha bean kris-
tenien vad.

G. *Hag hen na hell den badei, nemed ar
veleien ?*

R. Pep den en he skiant vad a hell ba-
dei, pa ve red.

G. *Petra zo red da ober evit badei ?*

R. Skuil an dour war benn ar bugel ha
laret er memes amzer : *Me az bade en ha-
no an Tad, hag ar Mab, hag ar Speret-Santel.*

G. *Pesort intansion zo red evid badei ?*

R. Intansion an Iliz.

G. *Pesort dour zo red evit badei ?*

R. Dour naturel.

G. *Hag en eo difennet dalean da vadei ar
bugel evit gortoz ar paeron pe ar vaeronez ?*

R. Ia, rak lakaat a reer ar bugel en risk
da vervel heb Badeiant.

G. *Pesort dever en deuz eur paeron hag
eur vaeronez ?*

R. Dever da rei kelennadurez d'ho fillor
pe d'ho fillorez, mar mank d'he a beurz
ho zud.

G. *Pet zakramant ar Vadeiant zo ?*

R. Na zo nemed unan : ar Vadeiant dre zour.

G. *Petra eo eta ar Vadeiant dre wad,
hag ar Vadeiant dre zezir ?*

R. Diou voien da vean zalvet, pa vank
ar Zakramant.

G. *Ha red eo bean badeet evit mont d'ar
Baradoz ?*

R. Ia, anez ar Vadeiant n'en deuz Baradoz ebed.

KELENNADUREZ

1° Adnevei gwestlo ar Vadeiant, da vianan eur wech er bla.

2° Diski penoz e tleer badei.

III. KENTEL

War ar Gonfirmasion.

*G. *Petra eo zakramant ar Gonfirmasion ?*

R. Eur zakramant a rô d'imp ar Speret-Santel ha nerz da zouten hon fe evel kristenien barfet.

G. *Hag hen eo red kaout ar Gonfirmasion evit bean zalvet ?*

R. Salokras ; mes pec'het eo chom hep he resev dre leziregez pe disprizanz.

G. *Piou a ro zakramant ar Gonfirmasion ?*

R. An Eskop.

G. *Perag e ra an Eskop eur groaz war an tal er Gonfirmasion ?*

R. Evid diskoue ne dleomp ket ruian dimeuz kroaz Jezuz-Krist.

G. *Perag e rô an Eskob eun tolik bian war ar jod ?*

R. Evid diskoue e tleomp bean prest da c'houzany an oll dismeganso hag ar maro zoken evid difenn ar fe.

G. *E pe stad e renker bean evid reseo ar Gonfirmasion ?*

R. Red eo bean en stad a c'hras, ha gout ervad ar c'hatekiz.

G. *Pesort pec'hed a rafe neb a ve konfirmet en stad a bec'hed marvel ?*

R. Ober a rafe eur zakrilej, ha ne zeufe ked ar Speret-Santel enhan.

G. *Pegeit e renker chom en Iliz goude ar Gonfirmasion ?*

R. Red eo chom da vianan ken n'en deuz roet an Eskob he vennoz.

G. *Da betra eo dalc'het ar re zo bet konfirmet ?*

R. Dalc'het int da zifenn, hep aoun na mez, lezen Jezuz-Krist, ha da heuil kelenadurez an Aviel.

G. *Perag e c'houll an Iliz paeron ha maeronez er Gonfirmasion ?*

R. An Iliz a c'houll paeron ha maeronez er Gonfirmasion da deurel evez war fillor hag ho fillorez, evit ma kerzoint bepred en hent mad.

G. *Piou a dleer choaz da baeron ha da vaeronez Gonfirmasion ?*

R. Kristenien vad ha konfirmet.

KELENNADUREZ

1° Diwall da gontristan ar Speret-Santel dre ar pec'het.
2° Eur c'hristen konfirmet a dle bean euz zoudard kalonek da Jezuz-Krist.

IV. KENTEL

Zakramant ar Binijen.

WAR AR GONTRISION

*G. *Petra eo zakramant ar Binijen ?*

R. Eur zakramant hag a lem ar pec'hejo gret goude ar Vadeiant.

*G. *Pegouls e resever zakramant ar Binijen ?*

R. Pac'h eer da govez, mar resever an absolven.

*G. *Kemend a ia da govez, hag hi zo pardonet ?*

R. Salokras, rag an oll na reont ket an treo a zo red evit bean pardonet en zakramant ar Binijen.

*G. *Pet tra zo red evit bean pardonet en zakramant ar Binijen ?*

R. Tri : ar Gontrision, ar Govizion hag ar Zatisfaksion.

G. *Pehini anhe a zo mui a ezom anehan ?*

R. Ar Gontrision.

G. *Petra eo ar Gontrision ?*

R. Eur glac'har er galon da vean offanset Doue, gand eur wir volonte da chom hep hen offansi en amzer da zont.

G. *Pet sort Kontrision zo ?*

R. Daou sort : ar Gontrision barfet hag ar Gontrision imparfet.

G. *Petra eo Gontrision barfet ?*

R. Eur glac'har da vean offanset Doue, abalamour d'he vadelez a zo dreist muzul.

G. *Petra eo ar Gontrision imparfet pe an Attrision ?*

R. Eur glac'har da vean offanset Doue, gand aoun euz he justiz.

G. *Ha ni hell bean pardonet gant ar Gontrision parfet hepken ?*

R. Ia, ma n'hellomp ket kovesaat ha kaout an absolven.

G. *Ha ni hell bean pardonet gand ar Gontrision imparfet hepken ?*

R. Salokras, heb an absolven.

G. *Gret eun akt evit goulen ar c'hras da gaout kontrision ?*

R. Ma Jezuz, dre ho Pasion,
Reit eur wir glac'har d'am c'halon,
Hag eur propoz ferm da viken
Da vean fidel d'ho lezen.

G. *Ouspenn ar glac'har eta eo red ive kaout eur propoz ferm ?*

R. Ia, rag ar propoz ferm a zo lod deuz ar Gontrision.

G. *Ar re a bropoz bemde en em gorrijan ha ne reont ket, hag hi deuz eur propoz ferm ?*

R. An dra-ze n'hell ket bean.

G. *Hag hen eo mad ho c'hoviziono ?*

R. Danjer zo na reont ken liez a zakrilej.

G. *Petra eo ar propoz ferm ?*

R. Ar propoz ferm a zo eur wir volonte da ziwal euz ar pec'hed en amzer da zont.

G. *Penoz ec'h anaveer ar re ho deuz eur propoz ferm ?*

R. Pa ho gweler o chenj a vue hag a kuitaat an okasion.

G. *Leret d'in ar voien da zerc'hel mad d'ar pez hon euz prometet ?*

R. Pidi Doue, kuitaat an okasion Ira terri an techo fall.

G. *Gret breman eun akt a Gontrision.*

R. Ma Doue, me zo glac'haret
D'ho pean kemend offanset,
Abalamour d'ho madelez,
D'ho majeste, d'ho santelez.
Me a bromet en em viret
Gant ho zikour, ouz ar pec'het,
Spesialamant ouz ar re
Ma ôn ar muian kustum d'he.

KELENNADUREZ

- 1° Diskoue na zo pardon ebet hep Kontrision.
- 2° Disklerian kaliteo ar Gontrision.
- 3° Disklerian ar voien da gaout Kontrision.
- 4° Adnevel bemde ar propoz ferm.

V. KENTEL

Zakramant ar Binijen.

WAR AN GOVIZION

G. *Petra eo ar Govizion ?*

R. Eun ansao dimeuz hon oll bec'hejo d'ar c'hovezour evit kaout an absolven anhe.

G. *Perag eo ar Govizion eun ansao ?*

R. Abalamour neb a ia da govez, a dle, n'eo ket klask didamal ha digare, mes diskulian he bec'hejo.

G. *Evit petra e leret-hu eun ansao dimeuz an oll bec'hejo ?*

R. Evid diskoue na dleer nac'h pec'het marvel ebed er Govizion.

G. *Neb a nac'hfe eur pec'het marvel hepken er Govizion, hag en ve pardonet d'ehan he bec'hejo all ?*

R. Salokras, ober a rafe eur govizion nul ha sakrilej.

G. *Pesort remed a zo evit-han ?*

R. Adober he Govizion ha kovesaat he zakrilej.

G. *Petra zo red da ober kent ar Govizion ?*

R. Eksaminan ar gonzianz.

G. *Gret eun akt evit goulenn sklerijen d'en em ekzaminan ?*

R. Ma Jezuz, reit d'in sklerijen

Evit ober ma eksamen,

Hag eur gontrision barfet

A gement pec'het am euz gret.

G. *Var betra e tleer en em eksaminan ?*

R. War c'hourc'hemenno Doue ha re an Iliz, war ar seiz pec'het kapital, hag hon techo fall, ha war deverio hon stad.

*G. *Pegemend a zoursi a dleer da lakaat evid ober an eksamen a gonsianz ?*

R. Kemend hag a lakafemp gand eun afer hag a dal kalz a boan.

G. *Leret d'in ar voien d'ober buan ha mad eksamen a gonsianz ?*

R. Hen ober pep noz, kent mont da gousket.

G. *Petra dlee ar benitantet da ober o c'hortoz ho reng da govez ?*

R. Zonjal en ho fec'hejo hag ober akto a gontrision.

G. *Petra dleer da ober par ver arru en kichen treid ar c'hovezour ?*

R. Ober zin ar groaz ha laret gand humilite : *Ma Zad, reit d'in ho penediktion, mar plij ganec'h ; rag eur pec'her braz on.*

G. *Petra dleer neuze c'hoaz da laret ?*

R. Laret ar *Gonfiteor* bete meâ culpâ.

G. *Leret ar Gonfiteor en latin.*

R. *Confiteor Deo omnipotenti, beatæ Mariæ semper Virgini, beato Michaëli archangelo, beato Joanni-Baptistæ, sanctis apostolis Petro et Paulo, omnibus sanctis et tibi, Pater, quia peccavi nimis cogitatione, verbo et opere : meâ culpâ, meâ culpâ, meâ maximâ culpâ. Ideo precor beatam Mariam semper Virginem, beatum Michaëlem Archangelum, beatum Joannem-Baptistam, sanctos apostolos Petrum et Paulum, omnes sanctos et te, Pater, orare pro me ad Dominum Deum nostrum. Amen.*

G. *Leret ar Gonfiteor en brezonek.*

R. Me govez ouz Doue oll c'halloudek, ouz ar Werc'hez gloriuz Vari, bepred Gwerc'hez, ouz an Otro zant Mikel Arc'hel, ouz an Otro zant Ian-Vadeour, ouz an ebestel zant Per ha zant Pol, ouz an oll Zent da Zentezet hag ouzoc'h, ma Zad kovezour, abalamour em euz pec'het braz dre zonz, dre gomz, dre euvr ha dre omision : dre ma fot, dre ma fot, dre ma brasan fot. Rak-se e pedan ar Werc'hez gloriuz Vari, bepred Gwerc'hez, an Otro sant Mikel Arc'hel, an Otro zant Ian-Vadeour, an ebestel zant Per ha zant Pol, an oll Zent ha Zentezet ha c'houi, ma Zad kovezour, da bidi Doue evidon. Evelse beet gret.

G. *Pesort pec'hejo eo mad ho ansav da gentan ?*

R. Ar re vrasan.

G. *Mar deu mez d'ar penitant, petra dlehan da zonjal ?*

R. Zonjal eo eun dro vil ober ar pec'het, hag eur vertu hen kovez.

G. *Hag en zo awalc'h laret hon euz gret kalz a bec'hejo ?*

R. Salokras ; red eo laret ar spez, ar galite hag an niver anhe, gwellan ma heller.

G. *Goude bean ansavet ar pec'hejo, petra dleer da ober ?*

R. Achui ar *Gonfiteor*, ha chilaoui ervad ar c'hovezour.

G. *Mar kav ar c'hovezour eo ma differi d'imp an absolven per ar gommunion, penoz e tleer en em gomperti ?*

R. Red eo zenti gand humilite d'ar c'hovezour en pep tra.

G. *Hag hen eo mad a-wecho ober eur govizion jeneral ?*

R. Ia, mad eo, hag alies red eo he ober.

G. *Petra dleer da ober goude ar Govizion ?*

R. Trugarekaat Doue hag adnevei ar pro-poz ferm.

G. *Petra leret-hu dimeuz ar re na govesaont nemed eur wech er bla ?*

R. Laret a ran int tud didalve, n'ho deuz ked a zoursi euz ho zilvidigez.

KELENNADUREZ

1° Diski ar feson d'en em eksaminan ha da govez.

2° Diwall, mar geller, da zisklerian pec'hejo ar re all.

3° Diskoue piou eo red d'ehan ober eur govizion jeneral.

4° Alian da govesaat alies.

VI. KENTEL

Zakramant ar Binijen

WAR AR ZATISFAKSION

*G. *Petra eo ar Zatisfaksion ?*

R. Ar reparasion dimeuz an injur a ra pec'hed da Zoue ha d'an nesan.

G. *Penoz reperi an injur a ra ar pec'het da Zoue ?*

R. Dre ar binijen.

G. *Pesort pec'het a ra eur penitant a resev eur binijen hep intansion d'he ober ?*

R. Ober a ra eur zakrilej.

G. *Hag hen eo red ober ar binijen roet gand ar c'hovezour ?*

R. Ia, dindan boan a bec'het.

G. *Hag hen eo awalc'h ober ar binijen roet gand ar c'hovezour ?*

R. Salokras ; bue eur c'hristen a dle bean eur vue a binijen.

G. *Red eo eta ober pinijen ?*

R. Ia ; rag hon Zalver a lar, ma na reomp ket pinijen, a veomp oll kollet.

G. *Leret d'in an obero a binijen.*

R. Ar Iun, an Orezon, an Aluzen, hanvet ive obero pe euvro mad.

G. *Oblijet omp eta da ober euvro mad ?*

R. Ia, rag hon Zalver a lar : « Ar voë-zen ne dougo ked a freuz mad, a vo tro-« c'het ha strinket en tân. »

G. *A belec'h e teu d'an euvro mad ho merit ?*

R. A verito Jezuz-Krist.

G. *Ar re a varv en stad vad, kent achui ho finijen er bed-man, pelec'h eont-hi ?*

R. D'ar Pugator.

G. *Petra eo ar Purgator ?*

R. Eul lec'h a boan hag e chom enhan evid eun amzer ar re zo maro en stad a c'hras ha dleourien d'ar justiz divin.

G. *Hag hen a c'houzanv an ineo poanio braz er Purgator ?*

R. Ia, brasoc'h evid oll boanio ar bed-man.

G. *Penez e c'hellomp-ni ho zoulaji ?*

R. Dre an oferen, an euvro mad hag an induljanso.

G. *Petra eo an induljanso ?*

R. An diskarg dimeuz ar boan dleet d'ar pec'het.

G. *Petra zo red evit gonid an induljanso ?*

R. Red eo bean en stad a c'hras, hag ober ar pezh a c'hourc'hemen an Iliz evit-se.

G. *Gand an induljanso ha ni zo kuit d'ober pinijen ?*

R. Salokras, mes sikour a reont ar pe-c'her paour da baean he c'hle.

G. *Hag hen zo dleet ive reparasion d'an nesan ?*

R. Ia, mar hon euz gret gaou outhan en he vado, en he enor pe en kemend a zell outhan.

G. *Petra renker eta da ober evit dic'haoui an nesan ?*

R. Repari ar gaou oc'h euz gret,
Hag an drouk-komz oc'h euz laret,
Rei skouer vad, goulenn pardon,
Ha pardoni a greiz kalon.

KELENNADUREZ

1^o Ober a binijen en stad a c'hras.

2^o Kinnigan al labour hag an oll boanio da Zoue, ô gwellan pinijen !

3^o Diskoue priz an obero mad.

4^o Bean truezuz ouz an anaon.

VII. KENTEL

War zakramant an Oter.

G. *Petra eo zakramant an Oter ?*

R. Eur zakramant en em gav enhan en gwirione korf, gwad, ine ha divinite hon Zalver Jezuz-Krist dindan ar spezh a vara hag a win.

G. *Evit petra en deuz Jezuz-Krist gret zakramant an Oter ?*

R. Evit magan hon ineo ha diskoue d'imp he oll garante.

G. *Penez e teu ar bara hag ar gwin da vean chanchet en korf hag en gwad hon Zalver ?*

R. Dre nerz ar c'homzo zakr a lar ar belek var-n-he en oferen.

G. *Ar bara hag ar gwin, goude ma vent konsakret, hag hi zo bepret bara ha gwin ?*

R. Salokras ; ne chom an-he nemed ar spezh hepken.

G. *Petra eo ar spezh a vara ?*

R. Al liou, ar vent hag ar vlaz a vara.

G. *Petra eo ar spez a win ?*

R. Al liou, ar vent hag ar vlaz a win.

G. *Hag hen zo ive korf hon Zalver er c'halëi asambles gand he wad ?*

R. Ia, na zo disparti ebed etre he gorf hag he wad.

G. *Hag hen eo hon Zalver oll en eun hosti vian ?*

R. Ia, kement hag en eun hosti vraz.

G. *Pa dor ar beleg an hosti zakr, hag hen a dor ive korf hon Zalver ?*

R. Salokras, na dor nemed ar spez hepken.

G. *Pa ve torret an hosti, pelec'h en em gav Jezuz-Krist ?*

R. Jezuz-Krist en em gav oll en pep tam dimeuz an hosti torret.

G. *Jezuz-Krist hag hen a guita an env evid dont er zakramant an Oter ?*

R. Salokras, en em gaout a ra en env hag er zakramant asambles.

G. *Penoz e c'hell ar memes korf bean en env, hag en oll hostio zakr asambles ?*

R. Dre eur mirakl a c'halloud Doue.

KELENNADUREZ

1° Bisitan alies hag enori Jezuz-Krist er zakramant an Oter.

2° Zakramant an Oter eo ar zakramant a garante.

3° Heuil ar zakramant, pa ve kaset d'an dud klanv.



AR PENTEKOST

Digaset gand Doue an Tad ha Doue ar Mab, ar Speret-Santel a zisken war ar Werc'hez ha war an Ebestel.

VIII. KENTEL

War ar Gommunion.

G. *Petra eta eo kommunion ?*

R. Resev Jezuz-Krist en zakramant an Oter.

G. *Ar veleien, en eur gommunion dindan an daou spez, hag hi a resev mui evid an dud-all ?*

R. Salokras ; Jezuz-Krist zo oll dindan an eil spez hag egile.

G. *Neb a resev korf hon Zalver, a resev eta he wad ive ?*

R. Ia, rag he gorf a zo beo ha leun a wad.

G. *Petra zo red prepari kent mont da gommunion ?*

R. Red eo prepari ar c'horf hag an ine.

G. *En pe stad e tle bean ar c'horf ?*

R. Ar c'horf a dle bean war iun, propr ha modest.

G. *En pe stad e tle bean an ine ?*

R. An ine a dle kaout eur fe grenv, eur gonsianz pur hag eur garante vraz.

G. *Petra intentet-hu dre eur gonsianz pur ?*

R. Eñr gonsianz net a bec'het marvel da vianan.

G. *Penez netaat ar gonsianz ?*

R. Dre eur govizion vad.

G. *Ar re a gommuni en stad a bec'het marvel, hag int resev Jezuz-Krist ?*

R. Ia, mes ober a reont eur zakrilej euzuz.

G. *Penez e rafec'h-hu eun akt a fe arog ar Gommunion ?*

R. Me gred ferm, hep doutans ebed, Ec'h an da resev en efed Jezuz, gwir den ha gwir Doue, Er zakramant a garante.

G. *Gret eun akt a garante.*

R. Doue, leun a berfekSION, Me ho kar a greiz ma c'halon, Abalamour ma veritet Dreist pep tra oll, bean karet ; Ma nesan a garan ive, Abalamour d'ec'h, ma Doue ?

G. *Gret eun akt a humilite.*

R. Allaz ! Allaz ! petra òn-me, Da dostaat ouzoc'h, ma Doue ? Ne-d-on nemed eur pec'her kez, Mes c'houi zo leun a vadelez.

G. *Gret eun akt a zezir.*

R. Ah ! pebez dezir an euz-me Da resev bara an Ele ! Dizec'han 'ran gand ar zec'het, O c'hortoz tostet d'ho panket.

AKTO GOUDE AR GOMMUNION.

G. *Gret eun akt a adorasion.*

R. Doue eternal, leun a c'hloar,

Krouer an env hag an douar,
M'hoc'h adōr breman em c'halon,
Gant respet ha devozion.

*G. *Gret eun akt a drugare.*

R. Penoz hellin-me, ma Doue,
Trugarekaat ho majeste ?
Ne welan netra em ine
Nemet pec'het ha paourente.

*G. *Gret eun akt a garante.*

R. A greiz ma c'halon, ma Doue,
M'ho kar hag ho karo bemde,
Abalamour ma veritet,
Dreist pep tra oll, bean karet.

G. *Gret eun akt a ofrans.*

R. Me ofr em flas, Tad eternal,
Jezuz ma mestr, ho Mab Zantel ;
Me ofr c'hoaz, euz ma faourente,
Ma c'halon, ma c'horf, ma ine.

G. *Gret eun akt a c'houlen.*

R. O ma Jezuz ! zellet ouzin
Ha reit d'in ar pezh a fell d'in ;
Reit ar c'hras m'ho karin bepred
Hag ar c'hras n'hoc'h offansin ked.

*G. *Petra dleer da ober goude ar Gommunion ?*

R. Adori, trugarekaat ha pidi Jezuz-
Krist en hon c'halon, ha bean devot ar rest
deuz an de.

G. *Leret d'in ar voien da ober ervad hon
oll gommuniono.*

R. Ober pep hini anhe evel pa ve an di-
vean dimeuz hon bue.

G. *Hag hen eo awalc'h kommunion eur
wech ar bla ?*

R. Eur c'hristen mad na lez ket keit-se he
ine da iun.

G. *Pegouls e man ar brasan dever da
gommunion ?*

R. Da Bask hag en danjer ar maro.

KELENNADUREZ

- 1^o Disklerian pegemend a vad a ra ar gommunion vad.
- 2^o Diskoue pegen braz pec'het eo ar gommunion fall.
- 3^o Diskoue eo red kommunion arok mervel.

IX. KENTEL

War an Nouen, an urz hag ar Briedelez

*G. *Petra eo zakramant an Nouen ?*

R. Eur zakramant gret evit ober vad da
ine ha da gorf an den klanv.

G. *Hag hen eo red kaout an Nouen evit
bean zalvet ?*

R. Salokras, mes danjerus eo mervel
hep-hi.

G. *Ar zakramant-man hag hen ra noaz
ebed d'ar c'horf ?*

R. Er c'hontrel, rei a ra d'ehan ar iec'het,
pa blij gand Doue.

G. *Hag hen c'heller gortoz an heur di-vean evit resev an Nouen ?*

R. Salokras, red eo he resev, mar geller, keit m'hon euz anaoudegez vad.

G. *Petra dle eur c'hlanvour da ober epad an Nouen ?*

R. Ober akto a gontrision.

G. *Ha goude an Nouen ?*

R. Ankoat treo ar bed-man ha zonjal er baradoz.

G. *Petra eo zakramant an Urz ?*

R. Eur zakramant a ro galloud d'an dud a Iliz da ober ar pez a zo en c'harg, hag ar c'hras d'hen ober zantelamant.

G. *Digant piou e teu galloud an dud a Iliz ?*

R. Digant Jezuz-Krist.

G. *Hag hen zo dleet mui a respet d'ar veleien evid d'ar re-all ?*

R. Ia, abalamour ma tele'hont plas Jezuz-Krist.

G. *Petra eo zakramant ar Briedelez ?*

R. Eur zakramant a ro ar c'hras d'ar priejo da vevan zantelamant, ha da zével zantelamant ho bugale.

G. *Petra ziskoue zakramant ar Briedelez ?*

R. An union hag ar garante a zo etre Jezuz-Krist hag an Iliz he bried.

G. *Hag hen e c'hell ar vugale dimezi en despet d'ho zud ?*

R. Art sort dimeio-ze peurvuian ne vez ket binniget gand Doue.

G. *En pesort stad e renker bean evit resev zakramant ar Briedelez ?*

R. Red eo bean en stad a c'hras.

G. *Ar Briedelez hag hen hell an divorz he zerri ?*

R. Salokras ; netra, nemet maro unan deuz an daou bried, n'hell terri ar briedelez etre-z-he.

G. *Petra dle daou bried da ober evid en em zantifian ?*

R. En em garet, zével ervad ho bugale, ha bean fidel an eil d'egile beteg ar maro.

G. *Ar re zo gwal vue etreze, petra dleont-hi da ober ?*

R. Choaz eur c'hovezour zantel ha goulen gras ar Briedelez.

G. *Hag hen zo eur stad all parfetoc'h evid ar Briedelez ?*

R. Ia, ar stad a Virjinite.

KELENNADUREZ

- 1^o Diskoue pegement a vad a ra zakramant an Nouen.
- 2^o Pidi evid an dud a Iliz, ha goulen digant Doue pastoret ha beleien vad.
- 3^o Laret d'an dud bean modest en eurejo hag er prejo eured.

FIN AR C'HATEKIZ

PEDENNO

DIOUZ AR MINTIN HA DIOUZ AN NOZ

Eur gir war ar Pedenno-man.

Ar pedenno a hell bean ar memes re da vintin ha da noz, nemed ar Bater, an Ave, ar Gredo hag ar Gonfiteor a dleer da laret en latin da veure, en brezonek da noz ; Litanio Jezuz da vintin ive, ha Litanio ar Werc'hez da noz.

† *En hano an Tad hag ar Mab, hag ar Speret-Santel. Evelse beet gret.*

AKT A FE WAR BREZANS DOUE
MA Doue, me gred fermamant
Peno ez oc'h aman prezant;
Rak-se gant gwir humilite
Me rent homaj d'ho Majeste.

AKT A ADORASION.
M'hoc'h ador, Doue, ma
C'hrouer ;
M'hoc'h ador, Jezuz, ma
Zalver ;
C'houi eo ma mestr ha ma
roue ;
Ha d'ec'h òn oll, korfhag ine

AKT A DRUGARE.
M'ho trugareka, ma Otrò,
Dimeuz hoc'h oll madelezo ;
D'am bean krouet ha prenet,
Hag en hoc'h lliz resevet ;

D'am beñ (* henoaz) kon-
servet,
Ha diouz pep danjer diwallet.
* *Da noz leret hirie.*

AKT A OFRANS.
KEMENT a rin hag a lirin,
A zonjin hag a andurin,
A ofran oll da c'hloar Doue
Dre-z-hoc'h, Mari, mamm a
drue.

EKSAMEN A GONSIANZ.
MA Jezuz, reit d'in sklerijen,
Evid ober ma eksamen,
Hag eur gontrision barfet
Agement pec'het am euz gret.
*En em arretomp aman
da eksaminan hon c'hon-
sianz.*

DIOUZ AR MINTIN HA DIOUZ AN NOZ 91

AKT A GONTRISION.
MA Doue, me zo glac'haret
D'ho pean kemend offanset,
Abalamour d'ho madelez,
D'ho majeste, d'ho santelez.

RESOLUTION.
ME a bromet en em viret,
Gant gras Doue ouz pep
pec'het,
Spesialamant ouz a re
Ma òn ar muian kustum d'he.

AKT A C'HOULEN.
SELLET ouzin, ò ma Jezuz,
Ha reit d'in eur c'hras pre-
sius,
Ar c'hras d'ho serviji fidel
Ha d'ho karet bete mervel.

PEDEN D'AR WERC'HEZ.
GWERC'HEZ, ma mamm ga-
rantezuz,

Ma rekommandet da Jezuz ;
Gwerc'hez, ma mamm ha
ma itron,
Me rekommand d'ec'h ma
c'halon.

PEDEN D'AN EL-MAD.
MA El-mad, mesajer Doue,
Miret ma c'horf ha ma ine ;
Ma miret ouz an Drouk-
Speret,
Ha, dreist pep tra, ouz ar
pec'het.

PEDEN D'AN OLLZENT.
ME ho ped, Zent ha Zen-
tezet,
Da vean ma avokadet ;
Obtenet d'in, digant Jezuz,
Eur maro mad hag evuruz.

PATER noster, qui es in
cœlis, sanctificetur nomen
tuum, adveniat regnum
tuum ; fiat voluntas tua
sicut in cœlo et in terrâ.
Panem nostrum quotidianum
da nobis hodiè ; et dimitte
nobis debita nostra, sicut et
nos dimittimus debitoribus
nostris ; et ne nos inducas

HON Tad pehini zo en
env, ho hano beet santi-
fiet. Ho rouantelez deuet
d'imp. Ho polonte beet gret
war an douar evel en env.
Reit d'imp hirie hon bara
pemdiek. Pardonet d'imp
hon offanso, evel ma par-
donomp d'ar re ho deuz hon
offanset. Na bermettet ked e

in tentationem; sed libera nos à malo. Amen.

Ave, Maria, gratia plena, Dominus tecum; benedicta tu in mulieribus, et benedictus fructus ventris tui Jesus. Sancta Maria, Mater Dei, ora pro nobis, peccatoribus, nunc et in hora mortis nostræ. Amen.

CREDO in Deum, Patrem omnipotentem, Creatorem cœli et terræ: et in Jesum-Christum, Filium ejus unicum, Dominum nostrum, qui conceptus est de Spiritu Sancto, natus ex Mariâ virgine, passus sub Pontio-Pilato, crucifixus, mortuus et sepultus; descendit ad inferos, tertiâ die resurrexit à mortuis, ascendit ad cœlos, sedet ad dexteram Dei Patris omnipotentis: indè venturus est judicare vivos et mortuos.

Credo in Spiritum sanctum, Sanctam Ecclesiam catholicam, Sanctorum communionem, remissionem pec-

kouezfemp en dentasion; mes hon delivret a hep drouk. Evelse beet gret.

ME ho salud, Mari, leun a c'hras, an Otro Doue zo ganec'h; binniget oc'h dreist an oll groage, ha binniget ar frenz dimeuz ho korf, Jezuz. Santez Mari, mamm da Zoue, pedet evidomp pec'herien, breman hag en heur hon maro. Evelse beet gret.

ME gred en Doue, an Tad oll-c'halloudek, Krouer an env hag an douar; hag en Jezuz-Krist, he Vab unik, hon Otro; a zo bet konsevet dre c'hras ar Speret-Santel, ganet gand ar Werc'hez Vari; en deuz anduret dindan Pons-Pilat, a zo bet krusifiet, maro hag interret; a zo bet diskennet d'an ifernio, a zo resusitet, an drede de, a varo da veo; a zo pignet en envo, hag azeit en tu deo da Zoue an Tad oll-c'halloudek: ac'hane e teui da varn ar re veo hag ar re varo.

Me gred er Speret-Santel; an Iliz santel katolik; komunion ar Zent; remision ar pec'hejo; rezurreksion ar

catorum; carnis resurrectionem, vitam æternam. Amen.

CONFITEOR Deo omnipotenti, beatæ Mariæ semper Virgini, beato Michaëli archangelo, beato Joanni-Baptistæ, sanctis apostolis Petro et Paulo, omnibus sanctis, quia peccavi nimis cogitatione, verbo et opere: meâ culpâ, meâ culpâ, meâ maximâ culpâ. Ideò precor beatam Mariam semper Virginem, beatum Michaëlem Archangelum, beatum Joannem-Baptistam, sanctos apostolos Petrum et Paulum, omnes sanctos, orare pro me ad Dominum Deum nostrum. Amen.

Gourc'hemeno Doue

1. **EUN** Doue hepken 'adori, Ha dreist pep tra oll a gari.
2. Done en ven na doui ked, Na netra oll dimenz ar bed.
3. Ar zullio zantel a viri, Evid Doue ma serviji.
4. Da dad, da vamm a enori, Evid pell amzer ma vevi.
5. Muntrer na vi e nep feson, Nag a efet, nag a galon.
6. Diwall deuz al lubrisite, Hag a gorf, hag a volonte.
7. Domaj ebed da zen na ri; Ha, mar-t-euz gret, hast repara.
8. Gevier, na nep fals testeni, Mil birviken na liviri.
9. Na c'hoanta dre luksur pec'hi, Nag e sonj vil na n'em bliji.
10. Mado re all na zezir ked Ho c'hemeret hep lealded.

c'horfo; ar vue eternel. Evelse beet gret.

ME govez ouz Doue oll-c'halloudek, ouz ar Werc'hez gloriuz Vari, hepret Gwerc'hez, ouz an Otro zant Mikel Arc'hel, ouz an Otro zant Ian-Vadeour, ouz an ebestel zant Per ha zant Pol, ouz an oll Zent ha Zentezet, abalamour em euz pec'het braz dre zonz, dre gomz, dre euvr ha dre omision: dre ma fot, dre ma fot, dre ma brasan fot. Rak-se e pedan ar Werc'hez gloriuz Vari, hepret Gwerc'hez, an Otro zant Mikel Arc'hel, an Otro zant Ian-Vadeour, an ebestel zant Per ha zant Pol, an oll Zent ha Zentezet, da bidi Doue evidon. Evelse beet gret.

Gourc'hemeno an Iliz

- | | |
|--|--|
| <p>1. KLEO devotamant penn-
da-benn,
Bep sul, bep gouel, an
oferen.</p> <p>2. Santifian ri ar gouelio
War ho hed, evel ar zulio.</p> <p>3. Koves da bec'hejo hep mez,
Da vianan peb bla eur
wech.</p> | <p>4. Korf da Zalver a resevi
En amzer bask, hep differi.</p> <p>5. Iun a ri an daouzek deio,
Ar c'horafz, hag ar vijilo.</p> <p>6. Da wener kig ne zibri
ked,
Nag ive da zadorn nep
pred.</p> |
|--|--|

LITANIO JESUS.

KYRIE, eleison.
Christe, eleison.
Kyrie, eleison.
Jesu, audi nos.
Jesu, exaudi nos
Pater de cœlis, Deus, mise-
rere nobis.
Fili, Redemptor mundi,
Deus, miserere nobis.
Spiritus Sancte, Deus, mise-
rere nobis
Sancta Trinitas, unus Deus,
miserere nobis.
Jesu, Fili Dei vivi, mis.
Jesu, splendor Patris, mis.
Jesu, candor lucis æternæ,
miserere nobis.
Jesu, rex gloriæ, mis.
Jesu, sol justitiæ, mis.
Jesu, Fili Mariæ Virginis,
miserere nobis.
Jesu, amabilis,

Jesu, admirabilis,
Jesu, Deus fortis,
Jesu, pater futuri seculi,
Jesu, magni consilii Angele,
Jesu, potentissime,
Jesu, patientissime,
Jesu, obedientissime,
Jesu, mitis et humilis corde,
Jesu, amator castitatis,
Jesu, amator noster,
Jesu, Deus pacis,
Jesu, auctor vitæ.
Jesu, exemplar virtutum,
Jesu, zelator animarum,
Jesu, Deus noster,
Jesu, refugium nostrum.
Jesu, pater pauperum,
Jesu, thesaurus fidelium.
Jesu, bone pastor,
Jesu, lux vera,
Jesu, sapientia æterna,
Jesu, bonitas infinita,

Miserere nobis.

Jesu, via et vita nostra,
Jesu, gaudium Angelorum,
Jesu, rex patriarcharum,
Jesu, magister apostolo-
rum,
Jesu, doctor evangelista-
rum,
Jesu, fortitudo martyrum,
Jesu, lumen confessorum,
Jesu, puritas virginum,
Jesu, corona sanctorum om-
nium,
Propitius esto, parce nobis
Domine,
Propitius esto, exaudi nos
Domine,
Ab omni malo,
Ab omni peccato,
Ab ira tua,
Ab insidiis diaboli,
A spiritu fornicationis,
A morte perpetua,
A neglectu inspirationum
tuarum,
Per mysterium sanctæ in-
carnationis tuæ,
Per nativitatem tuam,
Per infantiam tuam,

Libera nos, Jesu.

Per divinissimam vitam
tuam, libera nos, Jesu.
Per labores tuos, libera.
Per agoniam et passionem
tuam, libera nos, Jesu.
Per crucem et derelictionem
tuam, libera nos, Jesu.
Per languores tuos, libera.
Per mortem et sepulturam
tuam, libera nos, Jesu.
Per resurrectionem tuam,
libera nos Jesu.
Per ascensionem tuam,
libera nos Jesu.
Per Sanctissimæ Eucharistiæ
institutionem tuam, libera
nos, Jesu.
Per gaudia tua, libera.
Per gloriam tuam, libera.
Agnus Dei, qui tollis peccata
mundi, parce nobis, Jesu.
Agnus Dei, qui tollis peccata
mundi, exaudi nos, Jesu.
Agnus Dei, qui tollis pec-
cata mundi, miserere
nobis, Jesu.
Jesu, audi nos.
Jesu, exaudi nos.

OREMUS.

DOMINE, Jesu-Christe, qui dixisti : petite et accipietis,
quærite et invenietis, pulsate et aperietur vobis ; quæsumus,
da nobis petentibus divinissimi tui amoris affectum, ut te
toto corde, ore et opere diligamus et à tuâ nunquam
laude cessemus.

SANCTI nominis tui, Domine, timorem pariter et amorem fac nos habere perpetuum, quia nunquam tua gubernatione destituis quos in soliditate tuæ dilectionis instituis. Qui vivis et regnas in sæcula sæculorum. Amen.

(500 deves a induljans).

LITANIO AR WERC'HEZ

KYRIE, eleison.	Virgo prudentissima,	Ora pro nobis.
Christe, eleison.	Virgo veneranda,	
Kyrie, eleison.	Virgo prædicanda,	
Christe, audi nos	Virgo potens,	
Christe, exaudi nos.	Virgo clemens,	
Pater de cœlis, Deus, miserere nobis.	Virgo fidelis,	
Fili, Redemptor mundi, Deus, miserere nobis.	Speculum justitiæ,	
Spiritus Sancte, Deus, miserere nobis.	Sedes sapientiæ,	
Sancta Trinitas, unus Deus, miserere nobis.	Causa nostræ lætitiæ,	
Sancta Maria, ora pro nobis.	Vas spirituale,	
Sancta Dei Genitrix,	Vas honorabile,	Ora pro nobis.
Sancta Virgo Virginum,	Vas insigne devotionis,	
Mater Christi,	Rosa mystica,	
Mater divinæ gratiæ,	Turris Davidica,	
Mater purissima,	Turris eburnea,	
Mater castissima,	Domus aurea,	
Mater inviolata,	Fœderis arca,	
Mater intemerata,	Janua cœli,	
Mater amabilis,	Stella matutina,	
Mater admirabilis,	Salus infirmorum,	
Mater Boni Consilii,	Refugium peccatorum,	
Mater Creatoris,	Consolatrix afflictorum,	
Mater Salvatoris,	Auxilium Christianorum,	
	Regina Angelorum,	
	Regina Patriarcharum,	
	Regina Prophetarum,	
	Regina Apostolorum,	

Regina Martyrum, ora.
 Regina Confessorum,
 Regina Virginum,
 Regina Sanctorum omnium,
 Regina sine labe originali concepta, ora pro nobis.
 Regina Sacratissimi Rosarii, ora pro nobis.
 Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, parce nobis, Domine.

Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, exaudi nos, Domine.

Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, miserere nobis.

✠. Ora pro nobis, sancta Dei Genitrix.

℟. Ut digni efficiamur promissionibus Christi.

OREMUS.

GRATIAM tuam quæsumus, Domine, mentibus nostris infunde; ut qui, Angelo nuntiante, Christi filii tui incarnationem cognovimus, per passionem ejus et crucem ad resurrectionis gloriam perducamur. Per eundem Christum Dominum nostrum. Amen.

Peden evid an Anaon.

DE profundis clamavi ad te, Domine; Domine, exaudi vocem meam.

Fiant aures tuæ intendentes, in vocem deprecationis meæ.

Si iniquitates observaveris, Domine, quis sustinebit?

Quia apud te propitiatio est, et propter legem tuam sustinui te, Domine.

Sustinuit anima mea in verbo ejus, speravit anima mea in Domino.

A custodia matutinâ usque ad noctem, speret Israël in Domino.

Quia apud Dominum misericordia, et copiosa apud eum redemptio.

Et ipse redimet Israël ex omnibus iniquitatibus ejus.

Requiem æternam dona eis, Domine.

Et lux perpetua luceatis.

Amen.

OREMUS.

FIDELIUM Deus omnium conditor et redemptor, animabus famulorum famularumque tuarum remissionem cunctorum tribue peccatorum, ut indulgentiam quam semper optaverunt, piis supplicationibus consequantur. Qui vivis etc.

AKTO EVIT GONID AN INDULJANSO.

AKT A FE.

Me a gred ferm, ô ma Doue,
An oll artiklo deuz ar fe ;
Rak c'houi oc'h euz he revelet
Hag a zo gwirion pa gomzet ;
Hag an liz a bropoz d'in
An artiklo-ze da gredi.

AKT A ESPERANS.

Ma Doue, ma oll esperanz,
En-hoc'h eman ma oll fianz.

Me esper digand ho madelez
Gras d'ober ma zilvidigez,
Dre zikour Jezuz, ma Otro,
Mar miran ho kourc'hemeno.

AKT A GARANTE.

DOUE leun a berfeksion,
Me ho kar a greiz ma c'halon,
Abalamour ma veritet,
Dreist pep tra oll, bean karet ;
Ma nesan a garan ive
Abalamour d'ec'h, ma Doue.

An Anjelus.

ANGELUS Domini nuntiavit
Mariæ :

Et concepit de Spiritu
Sancto.

Ave, Maria, etc.

Eccè ancilla Domini :
Fiat mihi secundum ver-
bum tuum.

Ave, Maria, etc.

Et Verbum caro factum
est :

Et habitavit in nobis.

Ave, Maria, etc.

Eun Arc'hel, a beurz an Otro,
A zi-kennaz euz an Envo ; (*bis*)
D'annons da Vari oa choazet
Evit Mamm da Zalver ar
[bed. (*bis*).

Ave Maria...

Mari a respontaz neuze :
Servijerez ôn da Zoue ;
Beet gret eta em andret
Herve m'oc'h euz d'in lavaret.

Ave Maria...

†. Ora pro nobis, sancta
Dei genitrix.

¶. Ut digni efficiamur pro-
missionibus Christi.

OREMUS.

GRATIAM tuam, quæsu-
mus, Domine, mentibus nos-
tris infunde, ut qui, Ange'lo
nuntiante, Christi Filii tui
Incarnationem cognovimus,
per Passionem ejus et cru-
cem, ad resurrectionis glo-
riam perducamur. Per eum-
dem Christum Dominum nos-
trum. Amen.

Neuze 'konsevaz eur bogel
Dre vertu ar Speret-Santel.
Hag ar Verb, en em inkarnet,
Etouez an dud en deuz bevet.

Ave Maria...

Pedet, Mamm zantel da Zoue,
Evidomp oll he Vajeste,
Ma veritimp oll ar graso
A bromet Jezuz hon Otro.

Gloria Patri, etc.
Sicut erat, etc. (1).

*Eur Bater hag eun Ave, evid hon Tad zantel ar
Pab, hag evid an Otro n'Eskop.*

1. **MARIA**, mater gratiæ,
Dulcis parens clementiæ,
Tu nos ab hoste protege
Et mortis horâ suscipe.

2. Jesu, tibi sit gloria,
Qui natus es de Virgine,
Cum Patre et almo Spiritu,
In sempiterna secula. Amen.

(1) AN ANJELUS e c'hiz all :

Ni ho salud gant karante,
Rouanez ar Zent hag an Ele ;
C'houi a zo binniget,

O pia,

Hag a c'hraso karget,
Ave Maria !

Ra vezo binniget Jezuz,
Ar frouez euz ho korf evuruz !
Kanomp gaud an Ele,

O pia,

He veulodi bemde,
Ave Maria !

Ni ho ped, Mari, Gwerc'hez
[c'hlan,

Pa vezimp war hon tremenvan
Da c'houlen gant Jezuz,

O pia,

D'imp eur maro euruz,
Ave Maria !

1. Mari, Gwerc'hez gallouduz,
Mamm douz ha mamm dener,
C'houi zo bepret truezuz,
En andret ar pec'her.

Pellet ouzimp adversour
[hon ineo ;
Dreist pep tra deut d'hon zi-
[kour
War hon maro !

2. Enord'ec'h, Zalver ar bed,
Gloar d'ec'h ha meulodi,
C'houi pehini zo ganet
Gand ar Werc'hez Vari.
Gloar d'an Tad, gloar d'ec'h
[ive,

Speret-Santel :
D'an tri ferson en Doue,
Gloar eternal !

Meulet, karet ha trugareket a vo Jezuz en Env hag en
Zakramant adorabl an Oter. Da James! (*Da laret taer gwech.*)

Ma Jezuz, mizerikord ! (*100 devez a induljans.*)

Kalon douz a Vari, beet ma zilvidigez. (*300 d.*)

Hon Ele mad, pedet evidomp.

Zant Joseph, pedet evidomp.

† En hano an Tad, hag ar Mab, hag ar Speret-Santel.
Evelse beet gret.

FIN AR PEDENNO.

TAOLEN

	pajen.
Lizer an daou Vikel Vraz di warbenn ar C'hatekiz-man.	1-VII
Otreadur ha gourc'hemen an Otro 'n'Eskop.	VIII-IX
Kantiko arog ha goude ar C'hatekiz.	X
Kentel war ar C'hatekiz.	1-2
Kentel war zin ar Groaz.	3
Kentan loden. War ar Gredo.	4-25
Eil loden. War ar Beden.	26-40
Teirved loden. War ar Gourc'hemeno.	41-66
Pederved loden. War ar Zakramancho.	67-90
Pedenno ar mintin ha re an noz.	90-100

FIN AN DAOLEN.

